

BRUD

Niv. 7

GOAÑV 1959

BRUD

ar Yez hag ar Vro

Kelaouenn lennegel drimizieg **Emgleo Breiz**

Niverenn 7
GOAÑV 1959

Komananchou :

Komanant-bloaz : 1.000 lur
Komanant-skoazell : 1.500 lur
An Niverenn 300 lur

Kas ar skridou, al liziri hag an arhant da :

« **BRUD** »
Revue littéraire d' « **Emgleo Breiz** »
B. P. 17, Brest
C. C. P. 1921-04 Rennes

Niv. 7



Ar Yez hag ar Vro

TAOLENN

◆ Per HELIAS	Kanadenn Penn ar Bed	5	
◆ Fañch INIZAN.	Ar marh griziuz Nozvez ar zaout kollet	17 26	
◆ Dreo KOULOUARN.	Mintin Hañv. Eun dornad barzonegou	33	
◆ Reun MENEZ KELDREG	An Torh Kaz	57	
◆ Padrig HELLENN.	Bremaig e teu ar pôtr d'ar gêr.	69	
◆ J.-D. RICHARD.	Barzonegou	72	
◆ BREHONEG BRO-WENED.			
J. RIO	Lost-Ru	74	
A. ALLAIN	Puns koh Kerderv	79	
◆ BREZONEG BEO AR BOBL.			
R. GARGADENNEC.	Kontadennoù diwarbenn Maner Navureg	80	
M. DIVANAC'H	Ar verh nevez dreset	84	
◆ LODENN AR RE YAOUANK.			
Saig MEAR	O klask an onner	85	
◆ NOTENNOU AR FURCHERIEN.			
J. TRICOIRE.	Geriadur ha geriadur a zo	89	
L. LOK	Blohaic'h ha Blohig. Dialog plaesant	90 90	
◆ AMAN HAG AHONT.			91
◆ EMBANNADURIOU « EMGLEO-BREIZ »			95

KANADENN PENN AR BED

Per **HELIAS**

An oberenn-mañ a zo bet kanet e-doug Goueliou Meur Kerne, d'ar zadorn 26 a viz Gouere 1958, dirag ar Menez Fruji, e Kemper, gand Lazou-Kana Tréteau et Terroir, Kelh Breizeg Roazon, Kelh Keltieg Redon, Iliz Veur Roazon, ha Landivizio, eilet gand eul laz-seni sumfonig a zaou-ugend muzisian ha biniaouerien Bagad Roazon. Kanerien o-unan: **SUZAN ETRILLARD, ROBERT PERRIN**, hag **YVON AR MARHADOUR**. An oll renet gand **JEF AR PENVEN**.

Sonerez gand

Jef Ar **PENVEN**

Ver sacrum

Bemdez en oabl eun heol a dremeno
 Gantañ 'n e greiz eun Doue d'or meno
 En e garroñs aour.
 Da beleh ez a peb heol ha peb Doue,
 Pa ne jomont ket e ti braz ar Roue
 Gand ar Gelted paour?

War-du Kornog emañ o gwele,
 War-du Kornog emañ o zud.
 Kerzom da glask hent ar chantele
 Eleh ma klever kan o brud.
 Kerzom araog
 War-du Kornog!

Savom er vag gand trid or yaouankiz!
 Stêriou a gas beteg bro ar frankiz
 En tu-all d'ar bed.
 Or hirri war stern, ha toulom on heñchou
 Da heul roud an heol o treuzi ar bleñchou
 Evid ren or red.

War-du Kornog emañ e wele,
 War-du Kornog emañ e dud.
 Kerzom da glask hent ar chantele
 Eleh ma klever kan e vrud.
 Kerzom araog
 War-du Kornog!

Pell diouz or bro 'mañ penn-tre an douar
 Digor war vor dindan stered klouar
 Ha koumoulenn hlaz.
 El leh-se an heol a jomo heb dale
 Eur wech evid mad pa vo skuiz o vale
 Hag a zalho boaz.

War-du Kornog emañ or gwele,
 War-du Kornog emañ or brud.
 Kerzom da glask hent ar chantele
 Eleh ma savim kan on tud.
 Kerzom araog
 War-du Kornog!

Follentez eo

Follentez eo kantreal keid
 Ha ma pad krohenn war an treid.
 Na kaer eul loch dindan eun doenn
 Zoken gand raosklenn pe gand broenn.
 Mond kuit beb bloaz da goulz ar zeo
 Follentez eo.

Gwelloh da vabden, war an douar,
 Eur vro da veva brao,
 Ha pa ne gavfe nemed mouar
 Da drempa gand dour glao.

Follentez eo dilezel tud
 A ra digemer deoh ha klud.
 An eon o nijal d'ar hreizteiz
 A oar peleh emañ e neiz
 Ha ni a gerz e mantell reo,
 Follentez eo.

Gwelloh da vabden, war an douar,
 Eur vro da veva brao,
 Ha pa ne gavfe nemed mouar
 Da drempa gand dour glao.

Follentez eo daouzrailha nask
 Pa n'ouzer petra zo da glask.
 Med geot ar hloz a goll e zaour,
 Ar Gelt, en ti, a zoñj el laour
 Hag a rank mervel da zond beo,
 Follentez eo.

Gwelloh da vabden, war an douar,
 Eur vro da veva brao,
 Ha pa ne gavfe nemed mouar
 Da drempa gand dour glao.

III

Pirhirined ar Hornog

Eun heol a breder hag a chal
 A zev bepred dindan on tal
 Epad ma kas or marhekadenn
 Da Benn ar Bed, dre lann ha raden,
 A-dreuz ar hoajou teñval-du
 Gand c'hwez ar maro a beb-tu.

Ar Gelt a vevo boudedeo
 Beteg ma kavo e zour-beo.
 A-boan arsavet ar pirhirin
 Ma krog e gezeg gand o houirin
 Ha pa ne gred ket ober van
 An Drouiz Meur a zav e gan.

Lod-all a daolo gwez d'an traon
 Da hada greun evid o naon.
 Ni n'om ket pôted doñv an alar.
 E park ar mor e trohim talar
 Da honid bouedenn or gwir vro,
 Dourvel ha bara war eun dro.

Ar hleze noaz, or benveg meur,
 A zailh d'e labour da beb eur.
 N'eo ket an hent ar gwaso dale
 Evid ar Gelt p'emañ war vale.
 Red-mad eo striva, red eo skei
 D'ar re ne garont ket distrei.

Ha tres on tud-ni, dre ar bed,
 A run da run a daol e sked.
 Leusket on-eus, gand klaou ha pourvez,
 Dindan ar hrugou, war o hourvez,
 Piou oar ped breur en douar kraz
 Da verka bonn gand eskern braz.

IV

Penn ar Bed

Er beure nevez ganet,
 E-tal ar mor didrouz,
 Ar Gelted meleganed
 A harz o hezeg rouz.

D'an huñvre koz gwizien feal,
 Ar mab warlerh an tad,
 Goude kantvedou o kantreal
 E verzont gopr o gwad.

Bremaig, en dour dirazo,
 E welint eur mell ti,
 Eur volz gwervèn a hlazo
 D'an heol o tiskenn di.

Dre borched glan ar Seiz Madelez,
 Pa gouezo mare koan,
 Ez aint war varh d'ar beurbadelez
 Da heul an Doue tan.

Alas, an heol o tremen
 A-uz d'ar mor a deh
 Ha sed int mantret kemend
 Ma yudont war e lerh.

Med eñ a veuz an tan e ludu
 Eur houmoul skañv ha krin
 Ken ne jom outañ nemed brulu
 E-kreiz eun dachenn lin.

Gand spernenn o halonad,
 Ar Gelted, leun a vall,
 Eleh kana maronad
 A vag eun ijin all.

Ha leusket ganto karr ha kezeg
 E savont listri prenn
 Da vond da glask war vor ar mezeg
 Evid o hleñved penn.

Baradoz ar mor

'Tre an avel hag ar mor,
E kaver an Enez gaerra,
Kollet e noz an envor
Pelloh 'ged ma heller skarza
E kalon ar vrumenn lor,
'Tre an avel hag ar mor.

'Tre an avel hag ar mor,
Ar Re Veuzet, o levezet,
Dindan o goueliou digor
A sko war-du skeud o Enez
Gand eun êl da houlenñ dor,
'Tre an avel hag ar mor.

'Tre an avel hag ar mor.
En douar, êlig, a welez
Savet e-kreiz eur goudor,
Emañ porz ar Beurbadelez
Eleh ma kouezo an eor

DA HERZEL ANAON AR MOR.

O Hortoz Antronoz

Deh a zo tehet
War naon ha sehed
Evel ma ra.
N'eus ket bet danvez
Da zevel banvez
Nag eun netra.

N'em-eus ket gwelet broz
Korriget an neizeur.
Eun damez he liou roz
Am-bo abarz nemeur.

An deiz a dremen
A dalvez kemend
Hag an deiz all.
Ar zav-heol nevez
Ne daol ket evez
Er paour-kêz dall.

Ar bed a zo re goz
Pe re yaouank on hoaz,
Araog m'eo deut an noz
E hortozan warhoaz.

Warhoaz, diere,
Skeud an arhouere
A baro noaz.
D'am henou bero
An dourenn dero
A raio blaz.

Endro d'ar moriou kloz
E klaskin eur mulgul.
O hortoz antronoz
E kavan lid ha sul.

Ar Hornog Ruz

War benn ar bed emañ a-zav evel gwechall
O selled ouz an heol o tiskenn d'eur bed-all
Ar hornog a zo ruz dirag or zell entanet.
War gein ar mor e halv mouez on tadou paganed.

N'on-eus ket tizet koulz hag int ar henta pal.
An awen goz a hwez 'n or halonou padal.
An noz, o klask an treh war abardaez peb devez,
A daol on horv e stourm bag on ene war evez.

En amzer vremañ e sav taniou war peb run.
Mabden a vag e benn o vroudañ ar seiz hun.
Ar Gelted, a-viskoaz, emañ o soñj en argad:
Eur marh e voue ruz a ra fring en o lagad.

Seiz ha Tri

**KAN KAER, KILHORE,
DINDAN AL LORE !**

Seiz aval gand o greun,
Seiz kazeg en o reun
Ha seiz pilligad bleud
Gand seiz bellenad neud
Seiz gwerzid ha seiz tan,
Seiz korrige ha seiz bran,
Setu ma hevrin kuit.
Jolig, petra fell dit ?

**KAN KAER, KILHORE,
DINDAN AL LORE !**

Tri mab da vamm ar bed,
Tri zraig d'ober pred
Ha tri banerad mein
Gand tri zornadig drein.
Teir gurun ha tri gi.
Teir vatez ha tri di.
Setu ma hevrin kuit.
Jolig, petra fell dit ?

**KAN KAER KILHORE,
DINDAN AL LORE !**

Eet eo ma hevrin kuit.
Jolig, kanet 'm-eus dit!

**MEULEUD, KILHORE,
EN OLL DRAOU GUZ,
WAR DRAON HA GORRE
D'AR HORN OG RUZ.**

Per HELIAS.

Faint, illegible text on the left page, possibly bleed-through from the reverse side.

DANEVELLOU

gand

Fañch INIZAN

Ar Marh Griziu⁽¹⁾

Ni a oa du-mañ, eur podad yod ganeom war an daol, hag e oam, va zad, va mamm, ar plab ha me, peb hini en e doull, o lakaad on loajou beuz da zevel yod d'ar penn, ha da hoùd piou a rafe an toull donna d'an amann teuzet da ziskenn e-barz. Va zad a ouie an taol; eñ e-noa ar gwir da leda an tamm amann war horre ar yod; hag a-veh m'en-deveze greet diou pe deir dro d'ar pod, o ruza gand e loa, e-pad amzer ar Benedisite, e ree eun toull en e du dioustu, en eur dapa eveljust an tamm amann hanter deuzet en e frailh. D'ober mad edo ar frailh-se er breiz, ya, med va zad a oa re lipouz.

Nebeud a varvailh a oa ganeom, skuiz oam ha naon du a oa, nemed :

— Daonched, a lavaras va zad, druz dija e henou beteg e heuz, Seha gaez, n'ho-peus ket greet hanter adarre !

E Breiz ema ar hiz da lavaroud, — n'eo ket tra yahuz meur-bed, avad, kredabl — « *Leun ar hov ha da gousked* ». Va zad a ranke breugeudi yantao (2) teir gwech euz a zon, araog beza terket (3). Pa veze gwelet o skei war e gov, neuze e oa tost da veza start warnañ.

— M'ad, mad, a respontas va mamm. Er wech all e vo greet peb hini e bodad deob, daon ! Nemed e teuh d'ar gêr gand peb hini e vaz, da aoza anezo. Setu aze eul lonk-e-eü (4), avad ! Biskoaz, yañ ! (5)

— Kleved a rafob homañ ar jelgenn-mañ ! a huanadas va zad. Alo, emezañ, digasit 'ta eur gontell lemm, ma vo distaget ar hreienn-mañ.

E Pariz amañ ne anavezet ket ar gwella tamm boued a zo er bed. Kaer e vez luhed ouz roll ar meuziou, ne gaver nemed traou flastruz, traou hag a vez kalonaj diwarno : moka, kasade, plum-ploum tra la la !... Kreienn yod ? Ya, kredabl sur, avad ! N'eus ket ano euz an traou-ze. Hag e-leb yod kerh e vez awechou d'an hini a gar, kaviar, a zo, na muiob na nebeutob, viou pesked esturjon. Ha n'ouzon ket ha ne ranker ket mond d'ar Berezina d'o herbed hoaz, mar plij ! Gwellob e vije d'ar Barizianed lakaad digas paneradou yod da frita deuz Breiz, hag e savje marteze muiob a vleo war o fistomeg. Kaviar ! Setu aze eul lañvrez ! Kit 'ta da houde, diwar ar viou glesker-ze, d'ober eun deveziad palarad pe falhad !... Deus 'ta du-mañ !...

- (1) Grizius = grizias (?), tomm d'e wad.
- (2) Yantao = da vihanna atao.
- (3) Terket = gwalhet.
- (4) Lonk-e-eu = lonk-e-avu, lonkez.
- (5) Yañ = da vihanna.

Va mamm a dennas ar pod diwar an daol, evid e lakaad en eur horn en oaled, e-kichen pod ar gwelienn. Me a oa krog en Almanag ar Vro Goz, hag ar plah he-doa da zistalia. Nav eur dija, eet an heol er vallin (1) eur pennad a oa. E miz du e oam, pe d'ar mareou-ze.

Va zad, kerkent ha m'e-noa evet e vanne laez diweza ankou-nac'haet gantañ en e volenn, a oa staget gand an Añjeluz, en eur skrabad e benn. E vod oa, hag aliez, atao moarvad, e veze o soñjal en e gezeg pe en e labouriou, dre ma tigase ar bater. Bourouellad ne ree ken, lonka an hanter euz al latin. Ar pennadou brezoneg avad a deue gantañ distagell, penn da benn ha dillo.

Setu a greiz oll va zad en e zav. Kredabl braz e oa en em gavet en e zoñj e penn gand ar hezeg, ha koulskoude « *chom a zav n'eo ket arad eo* », e vez lavaret.

— Seha ! emezañ. E pe leh ez on en em gavet ?

Seha a oa kustum ouz e daoliou-boud. A-neuze unan bennag a ranke beza er bater. Hag hi a zo devot kenañ. Mond a rafe d'an overenn war he fuchou, euz a Drefkaouenan beteg Sant Tegoneg.

— Mad, Seha, ne vezi ket pell.

— Kleo 'ta adarre hemañ, daon. En « *ave Maria gratia plena* » fasil ! Setu aze eur penn bedro !

Ha va zad a groge adarre, eun tammig kreñvoh neuze, evid diskouez e ouie e bater a zindan-heol (2). O, gouzoud a ree kalz ! Kemend sant ha santez a anaveze, hag ivez meur a oremus koz. Daon ! E Landi pa oa er skolaj e-noa bet eur priz evid displega latin ha brezoneg, ha gounezet gantañ eur « *Buez ar Zent* », greet gand an aotrou Yann-Vari Berrot.

D'an ampoent, etre ar Zancta Maria hag an Amen, ganeom-ni o respont, e oe klevet eun trouz boutou ponner o tond dre an nor bella kornzigor. Eur voutez yañ, n'ouzon ket pe an hini gleiz pe an hini zehou, a deue a-flagaj. Eben all a ruze muioh. Eur bale kamm moarvad, pe jorgell, pe imparfall. Lavaret e vije bet unan euz paotred ar Zabad o tond en ti, savet shehed gantañ. Du-mañ e oa ostaleri.

— Sell piou ! a reas va zad. Adarre d'an eur-mañ o tigas bara !

Saig Torig oa, mevel Olier ar Roh-Hlaz. N'oa ket kamm avad, med diou votez gantañ unan euz a beb foar, unan nevez torchet moarvad, hag eben all, mallaz an Doue, hini ebed a zindanni, ha diskilh hoaz en taol-ze !

Luhed (3) a ree Saig, en eur antreal, ouz ar goulou. Ar gwenn

a veze gwelet en e lagad kleiz, evel ma e-nije bet eul lagad arbant. Luch-katre, Saig a wele dre ar memez tro-zell eur marh-tan hag eur harr-nij asamblez. Ha du-mañ, en ti, pa veze e benn troet warzu ar hadrailh (1), el leh ma vez lakeet ar hig moh da ziskouez, neuze e veze, gwir bater, o selled ouz va zad azezet en e blas etre kased an neud hag an douzier. Hag al leh-se a zo, atao yañ, treuz teir balaenn euz ar hig ha lard braz ar vronnegenn.

Saig e veze d'ar wech laouenn o tond en ti, laouenn evel ar Spered Santel, eur peziad torz vara a zeg lur gantañ dindan e gazell : « *Bara brao, Per, sklêr e-giz al loar !* » eme Zaig en eur hoarzin. Tamm fallagriez ebed en e gorv. Eul lastez hir oa e skouarn. Komañs a ree c'hoari gand e voned pe « *dapa lapined tuz* » evel ma vez lavaret. Plijadur e vez o weled ar seursiou-ze beb an amzer. Da verher e teue atao pa helle, ha du-mañ eh echue e dro kas bara. Saig e veze greet goap outañ gand an oll, med ne oa ket fin awalh da gompren peur. Dimezet oa gand unan euz e galite, Marharid ar Chig. Homañ a chike evel eur gwaz, ha troha lann a ouie ivez, koulz ha n'eus forz piou.

Ya, med an taol-mañ Saig a oa truezuz da weloud, hir e vailh (2), difoupet e zaoulagad. Heñvel ouz eun taro penn-follet, berr warnañ, ne oa ket gouest da lavaroud seurt.

— Saig, petra ar foultr a zo en em gavet ganez ? a reas va zad, mantret-maro.

— Pe... Pe... Pe... — Saoz oa hoaz ive mar plij, oll edont gantañ, ar paour-kaez den ! — Pe... Pe... Pe... naoz, a zistagas Saig, da... da... da... oust ha n'ho-peus ke... ke... klevet va charabañ-me o tremen dirag an ti ? Ko... Ko... Ko... Kollet eo, Per !

— Añ ! a reas va zad. Deom neuze, dioustu, Fañch vihan, da weled. Arabad dale. Kea da enaoui al letern braz. Mardoen, oll e kollo anezo ! E vragez a gollo ive, eun devez a deuy ! O, den paour ! Penaoz eo en em gavet ganez neuze, Saig, koll da garr ha da loen ? Eüruzamant eo trafiket ar bara ganez !

— Fe... Fe... Feiz, Per ? va harr a oa di... di... dirag ti-forn Peren, ha ne... ne... ne... n'em-eus greet nemed ober va zro en ti, digas eur vouchenn vara da Berrin, ha pa... pa... pa... pa on deuet diwar treuziou an ti, lo... lo... lo... loen na karr ebed ken wardro !

— Añ ! Setu aze eur gempenn, eme va zad. Hennez ar marh-antier-ze a zo eet da heul eur gazeg bennag adarre gand an diaoul. N'eus netra ken zur. Poent eo da Olier lakaad eur waskell dezañ mord en eun tu bennag, ya, ma teuy da veza dizeblant !

Mardoen, gwir oa ! Goude eun hanter munutenn vale e klevjom

(1) Ar hadrailh = gadrailh, eur benveg hag a zerviche gwechall da lakaad tammou kig moh istribilh.

(2) E vailh = e vizañ.

(1) Er vallin = da gousked.

(2) A zindan-heol = dre eñvor

(3) Luhed = selled a gorn gand daoulagad digor braz dre ar spont, an estlamm pe an droug.

eun trouz bale all o tond etrezeg ennom. P'am-oa gwelet e benn! Eun toucher euz a Landi, a anavezem pell a oa, bet o kerhad eur gazeg da gas da laba, en arvor en eun tu bennag, hag o vond d'he has da Landi da graou eun trafikier. Eun den a boan all, hag a wel a beb seurt en e vuhez: riou, taoliou « ru »; sehed n'en-dez ket aliez avad, chom a ra a zav e peb ostaleuri. Du-mañ a anaveze abaoe an dro-genta moarvad.

— Ep! Mous; a lavare din-me, pa vezen war-dro an ti. Digas 'ta d'ar red eur boutegad lann din-me amañ, kuit din da ziskenn diwar hemañ ar hañval-mañ. Sed aze pevar real. Eur boutegad lann oa eur hartad gwin ruz.

— Añ! emezañ deom. C'hwil a zo war ar hlask ive?

— Feiz ya!

— Mad, 'trezeg amañ int deuet: va hazeg eet kuit diganin hag eur harr bara war he lerb. Diskennet int beteg amañ, ha goude n'em-eus klevet trouzig ebed ken. Gwir eo edon hoaz pell, ha gand trouz ar mor ouspenn, ha me ponner-gleo, penaoz a gav deoh!

Saig Porig a oa komañset da hoarzin adarre, eun tamm sklêraet e zremm, o weled tud all war e dro bremañ. Mardoen avad, rêzon e-noa! D'ober petra ober bilou war an tamm douar-mañ, evid bugale ar re all? Olier ar Roh-Hlaz e-neus êz da bremañ karr ha loen, mar deo eet ar re-mañ er mor. *Savete ma sav!*

Mad, soñj am-eus. Kement-se a oa trist awalh memez tra. Mond da glask kezeg en noz teñval-sah! Ouspenn e oan yaouank flamm hag ar sperejou yaouank a deu buhan da gaoud aon, ha da vond e touan (1), evel ar yeot blin nevez er prad, pa deu an disterra barr-heol d'o zomma. Va gwad a zanten o tiskan a nebeudou, ha kaoud a ree din ez ee ivez va bragez da heul. Ne reen nemed sevel anezañ. Du-pod an noz endro din, ne welen ket zoken va boutou koad, nemed a beb an amzer, pa bare warnon sklêrijenn trelluz al letern, ar goulou o lampad ebarz hag o vogedi. Hag e welen chupenn va zad o lugerni gand al lard, pe n'ouzon ket petra, a oa outañ e teoaad an danvez.

D'an ampoent ar hi a zibune en eur harzal, euz ar bern kolo, klevet gantañ marvailhou ha c'hwez tud dianvez. Deuet oa en eur redadenn beteg ennom, ha dioustu, heb chom da nehi, e kendalhas da oufal, goude beza bet c'hweset on bouteier. Mond ha dond a ree, e penn straed ar Pont-Koad a gomañse eno. Ar paour-kêz ki, ma ne vefe ket bet mud, e-nefe lavaret deom dioustu trezeg peleh mond. Diskouez awalh a ree e oa traou nevez e penn ar straed hir. Eur hi e-neus eur fri tano. Me gomprens anezañ pa ree: « ouf, ouf, ouf, a... ou... ou... ouf! aou! aou! aou! » Kazimant e kaozee koulz ha Saig Torig. Saig ne ree nemed harzal ive, hag e leh « aou! aou! aou! » e ranked kompren: ahont, ahont emaint... Chas all a veze

(1) Mond e touan = koll ar penn.

klevet hoaz, chas stag tro-war-dro, o harzal d'ar bleiz abaoe eur pennadig. D'ar bleiz, ya! O harzal etrezeg amañ edont ive, yan. Ar chas a glev diouz a bell-pell.

Jipig, or hi ne vanke ket. An disterra trouz a veze diskleriet deom dioustu gantañ. Ha diwall neuze na vije unan bennag o laerez gwial en noz, er foeneg koz, pe o lakaad stignou, pe hoaz eun aneval oh ober skolig-louarn, evel ma oa hirio.

— Mad, a reas va zad. Koulz eo deom, paotred, mond dre ar straed-mañ, ar hi a verk. Bremaig, Saig, ma vezont kavet, ho-peus eun dorz vara da rei d'ar hi!

— Mad, mad, mad, Per. U... u... u... unan a zo chomet, m... m... m... mar demañ atao.

Ar hi ez ee araog atao, skei a ree beb an amzer, hag e tizroe da zond da lampad ouz va zad; kontant da veza o vleina ahanom, mond a ree heb goulou, hag e lamme dreist ar heinadou fank seh a oa or stroba. Saig ha ni, beb kammed. Saig, a-benn bale eun, e-vije bet red dezañ lakaad eur votez er rollab-karr hag eben all war ar straed, ha hoaz!

— Añ! a reas paotr Landivicho. — n'o-deus ket e Landi ar me-mez kaoze eveldom-ni e-kichenn ar mor —, « Icho had he-do lakêt ahanon da bêa kas anei! Laret vo grêt d'ar « patron » warhoaz: eun tamm gwerz-butun am-eus da gaoud ouspenn ».

— Pa... pa... pa... paka a ri! eme Saig. Pe... pe... perag e-peus diskroget diouz he 'fenn, kaser kezeg bitatiz ma 'z out?

— Klevit hemañ! eme al Landivichavad. Te a zo paet da gas bara, ma faotr, hag ez a ar bara en da raog. Serr da henou, meularjez, bremaig e vo disternet al loen gand da vestr, ha te a vo atao e « tourne »!

— Alo, alo, paotred! eme va zad. Sioul, ma klevet eur bramm bennag. Ne welit ket eo ar hi ar finna ouzom oll? « *Sioul hag e tapom logod!* »

Ar hi, dre ma tostaem, ne harze ket kemend, nemed ober eur wech an amzer evel eur hwezadenn fri anienel. Ar straed a zo hir ha troidelluz, eur bern strouez a hed he hosteziou, bodou lann a gleiz hag a zehou o floura penn Saig, drezennou hir evel linennou da besketa, oh êsa derhel e dog. Euruzamant e oa don war e benn lakipod.

Me a anaveze mad dispar ar straed zon-ze, da veza bet deuet aliez dre an hent-se deuz ar skol, en hañv. Kement karrbont, kement torgenn a zo warni a gavjen atao gand va daoulagad serret. Ar hosteziou dreist-oll a anavezen piz: amañ e vez beb bloaz eun neziad brulu en hañv... Ha ped gwech n'am-eus ket bet lakeet peteganed da zond diwar o neiz, pa gemeren euz ar beskennou ruz-se, a veze bontet eur penn anezo etre daou viz, lakeet c'hwez enno neuze,

beteg ma teue da veza ken ruz ma chodou egeto, ha dao! Eur skla-kadenn seder war dal va dorn, ha trouz e-pad eun hanter-eur. Va mamm ne ree nemed « sklaker brulu » diouzin.

Pelloh e vez bleñ an hañv, em-eus soñj, melen sklêr en dro, ha melen vi en o hreiz. Dreïsto e veze atao toulladou bleñ-ribot, ken melen egeto, o stoui o fenn din dioustu pa zigore an nevez-amzer. Lavared a reent din: « Ma vezek ken seven ha me, paotr bihan, laosk abanon em zav. Kea gand da hent, ha warhoaz e weli abanon adarre, hag e rin dit, beb tro ma tremeni, eur zalud kran. »

Ya, deus 'ta! Dioustu ez eem a lamp warno, Paolig ar Groazig ha me, da hoùd piou e-nije ar muia. Ar paour-kaez bleñ-ribot a veze gwelet prest goude, ganeom dreïst or skoaziou, o weñvi dre an heol mintin. Hag ar gliz a goueze en on daouarn, en or choug, evel ma vije bet daelou o tivera diouto.

Bleuniou kaez! Perag ez oh ken brao krouet evid ober atao avi? Med n'ez it ket da gaoud re ziêz, pa vezoh briatet gand eur paotrig yaouank. Ne reot ho-taou asamblez nemed eur boket glan ha bresk, eur skeudenn. Ha bremañ pa on deuet en oad, beb tro pa dremenan e straed ar Pont-Koad, me a gav din eo an amzer drement ar brava da zigas da zoñj.

En devez-se n'edom ket o *klask brulu*, evel ma vez lavared.

— Ep! Ep! Di... di... digas al letern amañ, Per. Ko... ko... ko... kollet va botez! a reas Saig Torig warlerh.

Na pebez abadenn!

— Laka anezo en da hodell, eme va zad. Ar boutou hag ar bragez n'int mad nemed da stroba an dud. Alo, Saig, deus adarre!

Ar hi a harzas eun taolig, sonn ar bleo war e gein bremañ. Hag a greiz peb kreiz, e oe klevet eur hourichadenn hir ha skiltruz er penn all d'ar straed.

— De... de... de... dell! a lavaras Saig. N'emañ ket pelloh, an Du gast.

Mardoën, ar hi e-noa diskouezet an hent deom, hag ar marh d'e dro e-noa galvet Saig. Penaoz a gav deob ne vent ket bet kavet!

Ar grouadurien er bed-mañ a zo oll oh en em zikour. Diêz e vije tremen ar vuhez, ma ne vije atao etre on treid eun aneval bennag, braz pe vihan.

Erfin, e penn pella ar straed, pa e-noa savet va zad ar goulou, e oe gwelet eno, ehanet, ar marh o paoata dirag ar houeriad beler, distaget gantañ al leton boug war hed tri hammed ero.

Ar gazeg koz, araog mond etrezeg Vaugirard da veza distamet he horv hanter vreïn gand ar gozni, — pagn e oa — goude beza labouret douar he mestr e-pad marteze pemzeg vloaz, a oa oh ober he horvad diweza war ar peuri druz ha fresk, en tu all d'an

dour. Daoust ha gouzoud a ree? An dour a deue em daoulagad o soñjal en he flanedenn, ha karet em-mije e ve bet troet e loen gouez eno. Me a vije eet d'he floura, da vale dre an dour war he bein! D'an oad-se e vez soñjou romantuz! E oan o paouez lenn war eul leor istor eur gazeg bet oh ober ar brezel pevarzeg e penn eur hanol 75: « *Un vieux canasson vous parle* »! Dioustu pa oe sonet an arzao-brezel, he-doa greet eur hourichadenn a levenez. Eur skouarn hepken he-doa kollet e Verdun, hag an hanter euz he lost er Chemin des Dames. Echu ar brezel, ne oa mad ken da netra, hag evel ar gazeg-mañ, edo ar spantehour o hedal anezi e Vaugirard. E-leh tremen dindan ar Volz a Enor, hi a oa paseet dindan palatrez (1) unan euz doriou braz al lazdi!

Petra a fell deoh? Ar bed a zo didruez. Koulskoude e Breiz, da bed am-eus bet klevet o lavared: « O, houmañ ar gazeg koz-mañ, sell, a jomo da vervel amañ. Evid ar pez a dalv d'ar higer! Ha neuze, diêz e kavjen gweled anezi o kuitaad ar porz, evid chom heb dizrei ken endro. »

Ped all am-eus gwelet o leñva, o selled ouz o anevaled o vond trezeg ar skaoñ a varo! En atanchou bihan e vez red gwerza, ar paour a rank beza krisoh e galon, pe, ma ne deo ket, e ra eur frapadig gouela: « Kazig koz kaez, mond a rankes kuit. » Hag aliez e vez roet kerh dezi, da veza kreñvoh da vond d'ar maro. Ya, n'eus nemed ar re binvidig hag a bellfe lavared gand eun tamm fouge: « Homañ ar gazeg-mañ a zo ganet amañ hag a varvo amañ! »

Setu ni e Straed an Dour e-kreiz an noz. Straed ar Pont-Koad a echu eno hag ez a da goll e Straed an Dour pe Straed an Ti-Nevez. An dour eienn a veze demwelet o tiskan diouz an neh, ha klevet oh hiboudi. An haleg hag ar spern gwenn, ganto eur bragezad iliao, a stoue o fennou, o selaou ar Boudig o kana a-dreuz d'ar beler, d'ar pempiz ha d'ar brouan. Med bremañ prest ne veze klevet nemed mouez rog an dud, an haleg o heja, ar spern, droug enno, o krivinad, ar beler o karnajad dindan treid an dud ha re an anevaled, ar hi en arraj. An dour a loske e ziskan kevriuz ha heson. Bremañ e oa eur jolori gantañ hag e taole strinkajou endro dezañ, evel m'e-nije bet ar houerig vihan c'hoant d'om beuzi oll.

— Ho! Ho!... Ei! Deus amañ, gastouer koz! Eur votezad en tu-mañ, eur jachadenn grenn en tu all. — Ata, loba a ri! Bremaig e valei d'ar gêr, amprevan! Te zo re ger evid da voued!

— Huo!! eme al Landivichavad. Hu, 'ni goz! Homañ e esae kaoud he 'fenn atao evid peuri, ar gaez koz! Den ne ouie he ano. Eur wech eet kuit euz ar gêr e vez kollet oll: perhenn, loened all o mignoned, oll e vezont kollet, beteg an ano. Bremañ ar haser e-noa trohet eur wialenn, evid dismegañsi anezi hoaz araog ar maro. Ya,

(1) Palatrez = maen-bolz an nor vraz.

taoliou war he hostez, evid echui, goude dezi beza treinet he huru-nenn e-pad he buhez.

Setu kavet ar jao!

— Savit er harr, paotred ! eme Saig Porig.

— Mardoen, ne deom ket ! a reas va zad. En eur vond d'ar gêr, ar charbañ a bignas war eur fultrenn roh hag ar rod a zibradas ken uhel ha me. N'ouzon ket penaoz ne oe ket bet chapel (1). Eun Doue a rank beza evid an anevaled ive. Bremaig, ma sell Saig euz ar roh gand al lagad a zo o para war an neñv, e tumpo hoaz.

— Diwall ! eme va zad. Emaout o vond da weled Sant Josef d'ar Baradoz. Sach diha, pa lavaran dit !

— Losk atao, Per ! Te... Te... Te... Tehed a rankan euz an ivern-mañ. Mardouen, va zad e-noa ranket kregi e penn al loen, a-bend-all e vije bet eet ar harr da hoari ruilhaig. Ar gazeg koz a deue trankilig warlerh, izel he fenn, nemed beb an amzer, pa dape eur votezad pe eun taol skourjez war he hroaz pe war he zalier. Neuze e ree eun taol bouh gand he fenn dislonket ha klañv. Kustum oa ouz an taoliou moarvad, ne ree ket kalz a van. Ar marh, araog, a houriche beb an amzer. Trei a ree e benn da esa c'hwesa ar gazeg.

— Ei ! Peul ! a lavare Saig. Ei, Du ! Hag ar vaz warnañ ive, med ne zante ket kalz an taoliou gand an dilhad kig hag ar gwiskad lard koz a oa war e gein. Kezeg Olier ar Roh a veze lard-pilb atao. Evel just ne vanke dezo nag ar griz nag ar gwiniz. Milin a oa gantañ ha fourn er memez amzer. Bara a veze roet d'ar hezeg leiz o horv.

— Ei ! Ei ! Setu aze ar pez a veze klevet da hanter-norz e-kreiz Straed ar Pont-Koad. Hag euz a dostoh, an drez o sinkanad, al laboused, trefuet oll, o cheñch plas er bleñchou hag er strouez.

— Ei ! Ei ! D'ar gêr ! War on lerh an noz sioul ha teñval a gemere he flas adarre er straed. Ar gwez direnket, o krena, a goueze adarre en o housk. E Straed an Dour, ar beler tri mil gwech maha-gnet, a dlee dre nerz an dour, sevel endro en o zav. An haleg hag ar spern, oll draou veo al leh gouez-se, oll a zelaoufent adarte, noz ha deiz, hanter gousket, hiboud luskelluz an dour.

Fañch INIZAN.

NOTENNOU

Eul lanvrez. — Eun dra difeson.
Bourouellad. — Balbouzad.
A-flagaj. — Teurel eun dra bennag kreñv ha garo.
Bale jorgell. — Kamm-digamm.
Diskilh. — Diskelhet.
Luch-katre. — Luch-kenañ

(1) **Chapel** = ober chapel = tumpa.

Eul lastez hir oa e skouarn. — Eun tammig re hir. Evelse e vez lavaret euz eun den berr a spered.

Kaser kezeg bitatiz. — Fall, diampart.

Peteganed. — Laboused bihan : laouenaniged.

Bleñ-ribod. — Foeon.

Spantehour. — Douger koad e ti ar higer, evid lakaad ar pemoh a-istri-bilh dre e dreid a-dreñv. Roet e vez ivez an ano-ze d'eun den heb kalz a ijin nag a vuhez.

Pempiz. — Louzaouenn en dour, e galleg : oenanthe safranée.

Karnachad. — Pe : karnajad. Ober karnach, trouz en dour.

Ar griz. — Ar pez a jom warleh an ed du. E galleg : grua.

Embannaduriou

EMGLEO-BREIZ

Nevez deut er-mêz,

Pez-C'hoari brudet

TANGUY MALEMANCHE

Gurvan

ar Marheg Estrañjour

Eul leor a 128 pajenn, stummet kaer, dindan eur golo livet.

600 lur franco.

FONDATION CULTURELLE BRETONNE - B. P. 17 BREST

C. C. P. 380-96 RENNES

Nozvez ar zaout kollet

Aliez e vez diank ar zaout du-mañ, eet e parkeier ar Puñs, pe e gwarimou Kabig, da hoari lampavan (1), dreist ar hleuz pe e breskign. E peb leh ez eont an eil warlerh eben. Evel just eo ar memez hini atao e vez oh « ober ar voger » da genta : ar Veleneg, ar haolig-se. Eul lamm, goude beza pennasket, ha dreist heb steki. Prest goude, avad, e vez gwelet ar re-all. Ruhenn ha Bailhenn goz, sounn o fennou ganto, gand eur vlejaden pe ziou, hir, hag euz a zon, o vond da lavaroud d'ar Veleneg : « E peleh emaoût ? Gortoz, ha ni a zo o vond ive ! » Med ar re-mañ o-deus muioh da hoari, dreist-oll an hini goz, gand he fouldrenn tez-kig, hag he eskern koz, o komañs strakal dija. Beb taol ma 'z a dreist ar hleuz, a gas yantao hanter kant luriad kagal d'he heul. Mond a ra koulskoude, ha floup ! heb steki ive.

— O, tribunale ! a ra va mamm, emaint eet da foar an Diaoul adarre ! O, Meleneg, vil-divalo !

Labour a vez beb tro d'o hlask, hag an tamm ki bihan miliner n'eo mad nemed d'o has war-raog. A-benn ar fin e vezont kavet, a-haoliad war ar brikoli, pe e kreiz eur parkad melchen kaer : pella ma hellont ez eont dioustu. Drebet neuze kalonennou ar brikoli, o hreizenn nemetken, evel pa ouifent e vent oh ober droug. Neuze e kabalont (2) avad, hag en em douront, ha bresa !

— O, ar gisti sod, a ra va mamm ; sell adarre 'ta ! En-dro, du-mañ, Meleneg ! Ata flaouchenn vihan, bremaig e teui diouz al leh-se ! Gagn, diwar an taol-mañ e vezi kaset d'ar foar, gaoliaterez vreïn ha touet ! En-dro, Bailhenn, gast all ! Kompar ar gaez-koz a dafe atao ive da heul ! Ma n'eo ket mantruz ! Kompren ar re-mañ, o saout gouez, biskoaz yan ! Ata, koz ki, dezo !

Na ped gwech n'am-eus ket bet klevet va mamm o pehi war he zaout, hag o lakaad, emezi, malloz da goueza evelse war he ene paour ! Kaozeal d'ar zaout ? Koulz eo ober d'eur hleuz bennag. Saout n'int nemed saout, ha n'ez eus ket sotoh eged saout ! Perag sorohad dezo ha mond da glask kastrilhez diouto ? Ar vaz, ya, ha herr !

Pa vezont bet kollet eur pennadig, pe eet da laerez, neuze o

(1) C'hoari lampavan = Kemer ebat.
(2) E kabalont = e hastont buhan.

gweler reud o hovou, leun ar straed ganto, o vond euz an eil tu d'egile, evel pa vijent tostig-tost da bala.

Ped gwech all n'eo ket bet tehet al loen (1), ar gazeg aliez, pa veze losket er park leton ! Eur ruadenn gand he zaou droad, oll he fenn warlerh en êr, daou pe dri sklak dre zindan he lost, ha dao euz an eil penn d'egile d'ar park. Kemend a dro a vez enni awechou, ma he hell ket atao chom a zav klok dirag ar hleuz. Mond a rank dreist, hag eil da foueta bro ! Eun hanter devez am-eus lakaet meur a wech da glask Fanny.

— Ma, emezon, kavet e vo e tu pe du. N'eo ket eet da foar ebed, re fin eo ha re vag ! Pa veze rentet e chome a-zav da beuri, en tu all d'ar zan, duhont, pe tostig d'ar hañgn (2). An oll gezeg ne jomont ket da hounid o herb, kerkent ha ma vezer diskrog diouz o fenn. Aliesoh e vezont gwelet o tehoud a bennherr hag o losker ten-nou en avel. « Trrrr ! trrrr ! » a ra va zad. Ya, « trrrr » atao, moarvad. Eur gazeg divestign a deu da veza gouez, beteg ma vez berraet warni.

Ar chas a vez kollet ivez. An dud, kentoh, a gav dezo e vezont kollet. Ar hi e-neus re a finesa : heñvel, ha ken gwidreüz eo ha Lanig al Louarn. Awechou ez eont da « bardona ». Ar hiz eo da vond beb bloaz da bardon Ar Rumengol, d'an dud, ian ; mardoen, avad, ez a ar chas d'o heul aliez, n'eo ket war eeun, ken kaz e pakfent mein, med a-dreuz, ribin dre ribin. Hag eh en em gav burzudou e Rumengol : lod euz an dud a vez eeun o vond ha kamm o tond endro. Ar chas, goude dezo tremen dre an douarou, dre an drez, dreist ar hleuziou, oh ober tro an nimpod (3), ne vezont ket kamm o tizrei, daoust dezo da veza diarbenn. Ha pa vezont kamm, « kamm ki pa gar », e redont ken buhan war dri droad eged war bevar.

— Ahont eo kollet ar hi, eme Kola an ti all. « Radio » a zo kollet.

— O, n'eo ket, eme Chann ar Hantonier. Ar pardon braz a zo e Kergidreun, oll emaint wardro ar giez eno. Deh em-oa gwelet c'hwec'h ki o tiwall peder buoh er foenneg hir. Radio a zo en o zouesk, daon, ar mestr eo euz chas ar hontre. Selaouit mad hag e klevfot an T.S.F. ganto.

Bremañ e vez roet a beb seurt anioiu d'ar chas war ar mêz. Anioiu rederien war velo ! Unan a anavezan e ano « Valentin Huot », eun all « Robic »... ha « Coppi ». Kredabl e tle beza eur « Pick-up » e tier an dud kran. Dre anioiu ar chas e vo gouezet dizale war betra int troet. War o hemend-all int eet !... Ar hi ne ra ket a forz, nemed e-no askorn da lipad hag eun toull da zisklavi.

(1) Al loen = al loen - kezeg.
(2) Ar hañgn = pe ar hagn (gagn), eur prad doureg, eun tamm douar fall.
(3) Tro an nimpod = an dro vraz.

Da bell ez a ar chas da hoari lampavan, med ral eo e vent kollet. Ar hontrol, gwellob int da zikour klask. Ar holl-mañ, gwentusoh avad, a hoarvezas du-mañ, e kreiz ar goañv, bremañ ez eus tri bloaz bennag.

Eur pezh hoariadeg domino a oa en ti, eur zadornvez d'an noz. Hanter luron (1) an oll dud, ne lavaran ket mezo-pud, med an daoulagad a gomanse fallaad ha mond war vihannaad a-nebeudou.

— Beza lakaet da « bar bidet », ian, kantolor ! Daon, hemañ a lavar « boud » pa e-neus da hoari !

Stanket ar jeu ha den ne ouie ! C'hoari a reent bremañ ha ne oa penn ebed ken, e peb kostez e veze staget dominoiou ha greet kroaziou. Kerkoulz a oa dezo teurel anezo dioustu en eur volenn, ha peob. Ar Hreah, eur zeller, a oa eet er-mêz d'en em zizamma. Kerkent e oa kilhet etre ar bern foen hag ar bern keuneud. Kavet e-noa evelato ar hliked adarre, nemed ne ouie ket e pe di edo ken. Aesaad a ree en em zelher gwelle ma helle. Gwelet e vez o hina, gand eur beh spontuz, eun daoulagad, peb hini anezo ken braz hag al loar. Ar butun a zistribilhe euz e zigaretenn dishreet war e heuz. Mad e vije bet da lakaad e-kreiz eur parkad ed da sponta brini. Dre ma oa moan ha braz, e herelle (2), kaer e-noa, evel m'o-deus ar gwial c'hoari o chom kenn sonn ha ken diloh hag an dero.

— Digarezit din, emezañ. Kompar 'ta, me a zo bet o selled c'hoari domino e Kermaria, hag on bet kollet diouz va hent. Lavarit din 'ta, mar plij, an hent da vond da Zant Noug.

Seriuze kenañ e chome, mardoen, med ar re all, gand o friou o komañs rozellad an dael, leun win ha leun a ludu butun, a oa koulskoude difluket da hoarzin :

— Mab-gast Kreah chaotret, eme ar Pesk, azez aze 'ta, hag e-po eur banne all. Deuet adarre ennañ e-unan, eb azezas e penn ar skaoñ, dirazañ eur skloturiad gwin all. Ha beh atao war an dominoiou. Kemend a jaog a oa, ha ken diwezad en noz, ma ne oa ket gouest ar zaout da gousked ganto. E Kermaria ema ar hraou saout en tu all da voger ar gegin, ha pa vezer ouz taol e vez klevet an naskou ob ober trouz, ar hernel o kregi ha o rikla war ar simant.

An teir buoh, skañv o skouarn, a oa savet en o zav, kredabl braz, an eil goude eben. Kavoud a ree dezo, fasil, goude beza greet eur vorenn, e oa deuet poent dijuni. kemend-all a jolori a oa gand an dud, en tu-mañ d'ar voger. An hini goz, staget gand eun nask tri mil spiset, a zistagas, kajimantig-sur, da genta, war-bouez jampalad (3). Dond a reas a benn da zigeri dor ar hraou en eur hijigad hag en eur storlokad ar hliked, ha gaol er-mêz ! Ar Veleneg ne oe

(1) Luron = tommet gand ar boeson.

(2) Herelle = heja, eet laosk war e vemprou.

(3) Jampalad = bresa.

ket eun hanter eur war he lerb, ar Gerne laer-ze, eur vuoh yaouank na wele kleuz ebed pa veze er-mêz, nevez prenet e Lanhouarne, den ebed eviti, bet mouchetet, me gred din, da zond d'ar foar. N'eo ket eun tamm kordenn hanter vrein gand an anwez a virfe outi pa garfe da derri he stag. Pa 'z a unan er-mêz, ar re-all o-deus youl da vond ivez, hag e sachont war bouez o horv hag a daoliou, beteg ma 'z a ar herdin en êr.

Da hanter-noz e oe klevet diouz an ti eur vlejadenn penn-da-benn hag a bellae diouz ar hraou. Ar Vailhenn ! Anaoud a reen he horn-boud. Setu me d'ar red d'ar hraou. Digor an nor, buoh ebed ken ! Gwasoh, ne oa ken nemed tud strobet, ken teo hag ar zaout.

— Deuit 'ta, emeve, da weled ! Amañ eo eet ar zaout d'ar zalud. Ma vije bet noz an Nedeleg, e vijen bet marteze hentchet gand steredenn ar Jude. Netra, noz du hepken. Hag an aotrouien brao-mañ a welfe, kredabl, stered a beb tu. Koulskoude, war an taol o-doa en em zalhet, savet e oant war o fod, goustadig, ha prest da vond d'ober ar hlask.

Al letern, enaouet ganin, a rankis laba, da dorcha ar werenn tri mil vogedet beteg an neh. Ne gaven tamm paper ebed ha tost e oe bet din kemered lost roched Cheun-Baol, a oa o ficha a-dreñv e gein. Darbet oe bet din ober eur banniel gwenn ha du dezañ ouz e zia-dreñv, heñvel ouz hini Yann Bennorz a zavas gand unan evelse, en amzer an Dispah, war beg tour Berven.

Pa em-oa greet eun tamm sklêrijenn el leur, e klevis ar Pesk : — « Ep, emezañ, Fañch, digas ar goulou din-me, buan ! » Finnoh eged ar re all, ne felle ket dezañ mond war e henou. Nann, mond a reas kerkent war al letern, koaget oll gantañ.

— Brao, emeve, emañ e-touez traou koaget (1) amañ !

— Mad, deom dre ar foennog, eme ar Pesk. Sur int eet e-barz, hag ez int. Dond a ree atao gantañ en eur gaozeal : « hag ez eo » pe « hag ez int ». Setu an eil bandennad saout er foenneg. Cheun-Baol, an hini a vez e zaouarn gantañ en e hodellou hañv-hoñv, a strobas gand eun duriadenn hoz, ha dao war e henou er gouer genta. Ne oa nemed glandour anezañ ken.

— Ahanta, eme ar Pesk, ahe e tivezvi, hag e ri !

Ar Hreah a oa dallet gand al letern. Ne oa ket gouest d'ober eur hammed, evel eur had, tapet er goulou. Al letern a veze gwelet evel eur geler (2) o pourmen a-dreuz ar foenneg, mond ha dond, sevel ha diskenn. Ne oa ket diêz gouzoud penaoz e valee ar Pesk, krog ennañ gand e zaou zorn.

— Ep ! Sioul, eme ar Pesk. Marteze e vezint klevet o peuri ! pa gouezas war e buchou, eun drugarez vrao, hag e oa !

(1) Koaget = eun den koaget a zo eun den mezo.

(2) Keler = tan-red en noz.

— Loulou, Loulou ! emezañ a greiz-oll. Gervel a ree goustadig e gi, stag er gêr e Kerviadeg, eur hontre hag a zo, atao ian, eun hanter leo euz a zu-mañ. — « Tie, tie, Loulou ! » emezañ hoaz. Loulou d'an eur-ze, a gouske, moarvad, e benn dindan e lost, e-tal eur bern kolo bennag.

A greiz-oll ez eas ar Hreah hir en eun toull kurun. (1)

— Selaout! Selaout! eme ar Pesk adarre, nemetañ o kaozeal. Amañ ez eus unan, hag ez eus. Sell diouz outi. Sao 'ta, porpagn, diouz al leh-se!... Kream gast!

Ar Hreah kaez ne veze gwelet nemed e voutou pell ' zo. E benn a oa e-touez ar peuri. Anez ar Pesk, e vije chomet eno d'en em lonktrêza.

— Deus 'ta, Fañch, a lavaras din ar Pesk, da zacha war bleo an ouner-mañ. An treid a zo tapet a zindan, hag ez int.

Mardoen, c'hoari a oe bet gantañ, muioh evid o hala ar vuoh diweza du-mañ, ar Vailhenn, a vez stard-kenañ beb tro. Neuze e komprenis n'edom ket war an hent mad, tamm ebed. « N'eo ket awalh koll a zaout emeve, bremaig e vo kollet an amezeien, kilhet pe veuzet an dud, ha gwasoh ar stal. Penaoz e hellfe tud imparfal kaoud chatal en noz? Alo, deom en-dro, paotred! Awalh evid hirio. Warhoaz emañ ar zul hag e vo amzer d'ober eur frapad hirroh, ma vez red. »

Kaled e kaven koulskoude dond kuit ha skrabad a reen va fenn, gand aon e ve bet krevet ar zaout a-benn ar mintin, gand o horvad.

— Alo, emeve, peb hini d'e hlud! Setu peb hini en e du, trezeg ar gêr. Chati e vije bet, kredabl braz, nemed divechi a reent, war-bouez beza binichet hag eva dour.

E-touez va liñseriou ne reen nemed huñvreal, huñvreal traou dipituz. An huñvre, eun dra fentuz, a lavar deom ar wirionez aliez, treuzwisket en eur stumm kevrinuz, ha spontuz, pa ne vez ket plijaduruz. Kompar, eb edon warlerh daou bemoh en noz, eur bleiz o hedal anezo pellob, azezet war e lost, e zaoulagad o para lemm. Awechou e troe ar bleiz en eun diaoul.

— Mad, emeve, gand an diaoul mud ez aint. Daou bemoh hanter zavet, bet gwelienn dezo leiz o hov e-pad eur miz! Lard-pilh dija! Mantruz eo! Kaer em-oa redeg war o lerh d'êsa o diarbenn, ar moh ez ee atao pellob-pella, ha tostoh-tosta da henou an diaoul pe ar bleiz. Ar wech kenta oa din da weled an diaoul gand e gontell kiger. Loeiz a Gerzuoh e-noa e weled gand e falh, o redeg war e lerh en noz, pa oa mezo. Hogen henez n'edo ket o huñvreal.

(1) **Toull-kurun** = toull lehid don er foenneier, implijet gwechall evid al lin, marteze.

Dihunet e oen gand va aon, ha goude beza moredet adarre, e stagis en-dro gand va huñvre. An taol-mañ e oa kavet ar zaout, erru e oant d'ar gêr en eur hoarzin din, moan evel kaerelled. D'ar zadorn vintin em-oa debret fourmaj-lêz « *Ar vuoh o c'hoarzin* », ha kredabl braz e welen dre va housk skeudennou golo ar voest. Poent e oa dijuni, ha dre va housk e soñjen e oa deuet ar mare da vond da rei o zamm dezo, araog o horo. Mioan iskiz e vezont atao diouz ar mintin. Setu an oll draou a vatouelle (1) va fenn din hag a lakae ahanon da huñvreal heb paouez.

Seiz eur o seni! — « Ep, emeve, er-mêz! Penaoz? Deuet ar zaout d'ar gêr! Daonchet, me a zo o huñvreal!... Deom dioustu d'o blask. »

Daou e oem eet adarre a-dreuz menez ha foenneg. A-benn eun eur glask, buoh ebed atao. Erfin, pa oem savet diouz an draonienn war run gwarimou Kabig, e weljom teir buoh, stag ouz ar piler-porz, dirag Ti-Nevez Peren!...

— Dell! emeve da Cheun, sell outo, ar gisti!

Yonig an Ti-Nevez a dremene dre e borz:

— An! emezañ, saout Kermaria int neuze! El leur edont ar mintin-mañ, hag em-eus o staget aze, da hedal mond d'ar foar ganto. Goroet int ganin. Staget oant d'en em horo o-unan. Setu em-eus sachet war o bronnou.

Mardoen, gwir oa, ha mad e-noa greet, gand aon n'o-dije paket taol (2) hoaz en o zez. N'eus droug ebed a gemend na zervichfe d'eur vad bennag. *Bevet du-mañ ha goroet en ti all!* Er hiz-se e teuom da veza pinvidig! E gwirionez e oe roet deom ar zailhad laez da vond d'ar gêr, nemed e oe hanter evet gand Cheun-Baol, an tan en e ziabarz abaoe an deiz araog.

NOTENNOU

Pennasket. — Ar pennask eo ar gordenn evid staga korn kleiz ar vuoh ouz he zroad dehou.

Kompar. — Kompren.

Gwentuz. — Diêz da weled pe da houzañv.

E heuz. — E elgez, e chig.

Chaotret. — Deut hir evel eur blantenn o vond da zougen greun.

Porpagn. — Hir ha moan.

Chati. — Kaoud eul lamm.

(1) **A vatouelle** = batouella, lakaad da strafuilha.

(2) **Taol en o zez** = taol-tan en o zez.

MINTIN-HAÑV

Eur dornad barzonegou

gand

Dreo KOULOUARN

Tarz an de

d'am mignon A. DANIEL

Er beure glaz e sav ar vorenn wenn,
Ar bleuniou war al leton ' zav o fenn,
Ar hog a hej e glipenn hag e blu,
Ar gwez a stou d'an hent euz an daou du.

Da darz an de e harz ar hi o tihun:
Klevit e chadenn ' mêz e loch o tibun.
Eun targaz treud d'an drot a dreuz ar porz,
Hag ar yer-Indez têt da grial forz!
Erru an de! Erru an de!

25-10-1958.

Distro ar Wennili

da F. FALHUN

Perag diragon ' klevan
Ar voualh he gwalh o kanañ,
An drask o klask he zrehi
Gand fouge foll an driski?

Sklintoh eged ar mouilhi
E sko têt-teod ar movi;
Ha klevit helibini
Eskadron ar golveni!

D'an heol ' kan ar rouzarded,
Reut o bruch 'vel soudarded;
'Touez deliou lufr ar gargailh
Daou pe dri filip ' varvailh.

Ar gazeg-koad ' vazata
War he zaboulin reuta;
Vel kure en e gador
E prezeg taer ar pabor.

Ha sklinton mouez ar pint
Er mintin sklér a dint.
Petra, o, Pennduglaouig,
'Zo nevez er brouskoadig?

O, bugel kêt diboell,
O, sav da benn ha sell!
Emaom o saludi
Distro d'ar gêr Gwennili.

Pik, pik! pik, pik, pik!
Bet eo en Afrik,
E lavar din ar beufik.
Strak, strak! strak, strak, strak!
Bet eo en Irak,
E lavar din ar bistrak.

Koulskoude, eme ar hefeleg
Hag a oar sarmon 'vel eur beleg
N'ankouêas ket hi he mignoned:
Addeut eo amañ da Bluskelleg;

Setu perag e klevez
Ar hor 'n e bez a-nevez:
Ar voualh he gwalh, an drask 'raog Pask,
Ha taboulin ar gazeg-koad
En tu all da liorz Tregoad.

« Uz da jerdin ar presbital
Emañ 'r wennili genta ' nijal »,
Eme ar zakrist koz d'ar beleg,
« Addeut int hoaz da vourg Pluskelleg! »

Can spring be far behind?

d'am bugale

« P' emañ ar goañv o reuzi
N' hell ken an hañv boud pell. » (Shelley)

Ar waz war ar wenodenn ' zo dihlaniet,
Ar gwez ' zo gand an arne bet mahagnet,
Ar yeot gand treid ar zaout a zo bet saotret,
Ar reo hag ar gwall-amzer ' ra o reuz
Dirag porrastell glaz ar hastell.

Heol splann ha puilh war on diskoaz a ruilh;
Gand ar wenodenn voan en avel skañv
Deut prim ganim da gutuilh bleuniou hañv
Da lakad 'kichen delwenn derv ar Werhez
Dirag porrastell glaz ar hastell.

Er-maez ar vro ' sonjan er ger

diwar

Home-thoughts From Abroad.

(R. Browning).

Me ' garfe boud e Breiz
P'eo dihunet an hañv,
Ha neb a zav da vintin ' wel, heb goud dar, emañ,
En dro d'ar broustou moan ha d'an izella skourr
A zav euz traoñ ar fust, dispaket 'n deliou flour
E-pad ma kan ar pint e liorz penn-an-ti
E Breiz, hiziu.

Mae ' gas Ebrel diwar e hent.
Ar rouzard ' neizia, 'r wennili kercent!
Kleo! 'leh ma stou ma wezenn-ber d'ar gênn
Hag uz d'ar park, o strewi war ar melchon
Gliz-beure ha bleuñ — war vegenn gromm ar skourrig
'Mañ 'n drask hirroell a gan diou wech peb sonig
Gand aon ' soñjfez n'hell adkavoud biken
E hwitelladenn gaer, töl-teod furlikin.
Ha daoust ma 'z eo ar yeot bleo reud gand ar reo-gwenn,
Bremaig e vo 'n e gaer pa zeuy ar hreiste laouen
Da zihun ar pao-bran, teñzor ar vugaligou,
Ha kaerroh kalz eged bleuñ lorhuz ar sukrinou.

Mintin Hañv

d'am mignoned Gab ha JANED

Glann ar mor glaz, e gliz ar mintin hañv
A hlebe lienn tano 'n deltenn velen,
Ha ni o tihun goude kousked skañv
On-daou gourvezet brao er bradenn velchen.

E pleg eur rohig skultet 'vel eur skudell
E kavem eur poulladig a zour glao
Da zivorenni on daoulagad mao
Evel ma rafe 'n evned 'tal eur stivell.

Ha dre ma tomme 'n heol a-nebeudou,
'Vel gevred, war ar rehier dizoloet
On daou diarhenn lammet, on eus skoet
Meur a vilienn hlaz da redeg war an tonnou.

Gwengolo 1954.

Almanak

d'ar vugaligou

Gand avel greñv ar miziou du
E kouez d'an traoñ ar bleñchou seb.
Peorien ar barrez ' deu dioustu
D'o dastum, kroummet gant o beh.

'Vid goañvi an nebeuta
D'ar hoadig da geuneuta.

Pa vo erruet an dommder hañv,
War vord gwenodenn ar brouskoadig
E vo e-touez an deliou skañv
Dare al lus hag ar mouarig.

'Vid hañvi an eürusa
D'ar hoad da lusa.

Koumoul

Da eñvor Y.-M. LECLERC, beleg.

Dre 'n oabl e red ar houmoul du
En avel yen a deh wardu
Ar huz-heol ruz. Hag e soñj din
Gweled du hont 'trezeg Gwengam
Pemp a gezeg d'ar pevar-lamm
O skara taer dre lann an aer,
O moue diroll en avel foll.

Eur mintin marzuz e miz Mae
A-uz da bradenn Koad-an-Nae
' Weler o peuri oll a-gevred
Eur vandenn deñved diskiantet.
En euriou teñval fin an noz,
Kollet gante o hent er roz,
Int, heb goud dar, pignet d'al loar.

Deil

da Visant SEITE

O, na glaz an delienn dener,
Na tener an delienn hlaz
A zispak war ar skourrig nevez
Mistr evel eur galon noaz!

O, na kaer an delienn aour
A zarev gand an heol gwrezuz
'Vel deliou ar hantolour pardon
Dirag ar Werhez, mamm da Jezuz!

O, na trist an delienn weñvet
Diframmet gand ar skarnil du,
Pa vez drebet gand ar preñved
Ha d'an teil taolet dioustu!

O, deliou paour, deliou kaer,
Deliou ledan, deliou munud
Om ni oll, ha 'vel dre laer
E tremenom gand on hunud.

Mez gand miz Meurz a-benn ar bloaz
E tispako deliou nevez
Deliou tener, deliou glaz
Mistr evel eur galon noaz.

Glo

d'an Dr J. TRICOIRE

Eur haouad glô en noz...
Me ' zoñj en dour
Zo stlapet gand ar prenestr,
En deliou flour
Bremañ gwalhet o gwalh
Ha pounner war o skourr.

Huñvreal ' ran ' ra glô
War ar bed-oll,
Eur pilad stankoh-stanka,
Mor dour foll,
O tihlann, o tilamm, o tiskarr
Gand nerz diroll
Ar gwez diwar o gwriziou
Skubet da goll.

An dour, an dour, eme ar geiz,
O gwas a nerz!
Eneb d'an dour an neb ' zav,
Neb a gerz
Vez mahomet ha skubet 'vel deil
Diwar ar hlann.
Eneb d'an tan an dour, eneb d'an dour...
... N' eus mann!

Job-a-Netra

da GERLANN

A zor da zor beb yaou e ya
Dre ruiou Kallag ' hed ar bla
Da gestell bara.

Pa zeu ar goañv, an erh, ar skorn,
E laer eun dorz euz an ti-forn
Hag e vez paket,

Peleh e kousk pa zeu an noz?
E penn eur wrahell pe er foz
Gand al laboused.

Kaset da Wengam d'an toull-bah;
Eno ' vez tomm, eno ' vez yah
'Pad ar gwall-amzer.

Dirag ar skol kañfarded droug
O wel'd 'z eus kevnid war e choug
A stag da hoarzin,

Kañfarded Kallag ' vez ' klask goud
Peleh eo chomet Jobig boud
Aboe meur zunvez.

A stlap gantañ mouded ha pri,
A lop warnañ, a hop, a gri:
« Job an alori,

Mez gand'an hañv ' tispak er-maez
Pa ziw an ar bokedou-laez
A-hed ar girzier.

« Job-ar-hoh-yeer, Job-a-netra! »
Heb ober van, Jobig a ya
Gand hent Pluskelleg.

Pa ziw an deliou war beb skourr,
Pa gan ar mouilhi 'tal an dour
O hanaouennig:

« Setu 'mañ Jobig deut endro
Job-ar-hoh-yeer, Job ar hoh-ki,
Job-ar-hevnid, Job-ar-mehi,
Job-a-netra, Job-al-lapous,
Job-al-laez-trenk, Job-al-laez-dous
Job-hô! Job-hô-ô!
Job an arvailh, Job ar spontailh,
Job an alvaon, an alori.
Geom dezañ eur jolori
D'e zaludi.
Erru eo Job, Job an astu,
Erru eo Job, Job al ludu,
Erru eo Job,
Job, Job
Erru! »

Mae 1958.

Kreiste

da Youenn DREZEN

Setu teir yar dindan eur harr
e korn al leur,
Kluchet er boultrenn
gand o hov
o klask ar fresk.

An tohad kerh
a strak o fluskenn
'n eun töl fresk.
Gwenan a darnij
o safroni
'tousez ar fleur.

E kraou ar zaout
ken sioul an traou
ma hellit kleved
Peb loen o skei
a doliou lost
war e vorzedou.

Euz toull an nor
e sav eur c'hwez
patatez devet:
Bez' he-do trouz
digand he fried
Soaz Follezou!

E korn ar wrahell
an tad koz
a zo moredet,
Hag e dog plouz
eur spontailh kêz
war droad eur forh.

Dizaonig kaer
ar helienn ' red
war e dal krizet.
An heol a ren
er mêziou kraz
gand brasa lorch.

Teir yar, eur harr
hag eur bern kerh
e penn ar hraou;
Eur wrahell blouz,
eur housker koz.
Na sioul an traou!
Gwenngolo 1958.

Dour-Red

da eñvor Jakez RIOU

E pleg an hent braz nevez, ' tal ar pont
E red an aven vihan war ar bili.
D'ar goañv e red gand eonenn ha gand spont;
D'an hañv e ra kov-gwenn 'vel ar gwennili.

Pa c'hoari ar skolidi war ar prad,
Pa houren ar gañfarded 'n eil egile,
Na fresk e kavont, goude, poz' o zroad
War ar moue glaz ha gleb e-leh ma kuz an dluzed.

Diframmet euz ar vein al lostou dru
Ha staget a-istribilh ouz o halson,
E red ar mirhed gouez d'an daoulamm ru,
O c'hwirin ken ma trid ar zaonenn gand an dasson.
Mezeven 1958.

'Vel Job an dall

da eñvor va zad

Ma vijen bet eur barz ha moueziet kaer,
Am-bije savet soniou dous ha taer
Da gana war ar blasenn ' tal an ostaleri,
D'ar merher d'abardaez ' kreiz ar jolori.

Eur pif euz va muzetenn ' savjen d'am diweuz;
E vouez skiltr ' vije klevet en dodion ha 'r reuz
Gand blejadeg al leueou, buzelladeg ar zaout
Ankouaet o goro.

Piou ' teuy gantañ ar maout?
Paotr ar herdin a hop a-bouez e benn
Da hervel e bratik ha gonid ugent real,
Pe Job an Dall, Kernevad-bragou-stenn,
A gan da Varijan d'he horn-bro boud feal?

Serr-noz, en ostaleri, emaint o daou sioul,
Paotr ar herdin, paotr ar zoniou o chopinad;
Hennez ' konta skoedou, Jobig e wenneien.
Tavet an trouz, ' tivizont 'vel beleien :

« Fall-ki e ya va henwerz, 'me paotr ar soniou, trist,
« Heug-mad on gand ar vuhez, 'honezan ken va jistr,
« Tamm bara na kig sall ne jom ganin em zah;
« Prest din 'ta, d'en em grouga, daou hourhed kanab yah! »

Dre zor an davarn digor war ar blasenn
' Vez klevet moueziou yaouank, skañv ha drant
O kana, o tiskana da Job an Dall e ganenn:
« Petr' a dalv an damant, petr' a dalv an arhant,
« Brava planedenn zo eo sevel kanenno.
« Tran la dira lon la; Tran la di re no! »

Ma vijen bet eur barz ha moueziet kaer,
Am-bije savet soniou ' blij d'ar geiz
Da gana war ar blasenn d'ar merher d'abardaez,
'Vel Job an Dall!

Mezeven 1956.

Moueziou

Ho mouez, em skouarn, o maouez, a gwez
Ken dous ha mel. Ken soutil ha c'hwez
Aveliyou mezeven e mêziou ma bro,
Fronde m'evuz ho mouez em halon a dro.

Vogalennou c'hoarz, saourusa soniri,
Ha tôliou-mouez-tarz, lirezina kaniri,
Mouez arhant kloh sklinton chapelig ar roz
Pe hiboud ar yeot gand allazig ho proz.

Eur vouez deoh ' respont er waremm hont,
'Pad ma kerzit laouen, marteze o vond
D'ar pardon er mintin, o hasta gand mall
Da gleved mouez aour kloh Bulad en brall.

Mezeven 1958.

Miln Ar Prad

da eñvor va Mamm

Dindan al linad glaz eo mouget Miln ar Prad,
Ne valo ken na kerh na segal,
Na gwiniz du na gwiniz gwenn;
N'eus enni ken
Na bleud na brenn :
Gand ar milliner koz eo ét ar stal a-blad.

D'ar razig yaouank e kont raz koz ar stêr
Pegen dudiuz oa en amzer bell
Pignad war rod ar viln, 'barz kambr ar bleud
Dre 'n toull er voger
'Leh ma troe an ahell
En eur wigourad e ganaouenn sklêr.

« E-pad ar bloaz e vezem en on bleud.
« Hizio siwaz e reom cher gwall-dreud.
« Diviet ar brenn
« On-eus drebet an treustou prenn,
« Ha beteg plenk ar grignol on-eus krignet;
« Ha setu an doenn doull koueet 'n he 'foull.

« War-neuñv da Viln ar Veuzid neuze tehet,
« ' Voem gand ar viln vraz nevez tapet nehet:
« Simant houarnet, kloz
« Koulz deiz ha noz,
« Ha tredan an Daonet ' kas an traou en-dro !...
« War goust ar moh er porz oe red dim mond da laerez!...

« O, Razig, ma mabig, sed on planedenn-ni,
« Penoñs en gwirione om koueet en gweoni.
« Dindan al linad glaz eo mouget ar viln goz !...
« Rag mervel gand an naon,
« D'an anaon
« E karfen mond eur pardaez a wengolo,
« Araog ma teuy er goañv ar gernez war ar vro !

« E pevar horn ar bez ra vezo tohad kaer :
« Eun teskad gwiniz gwenn, eun teskad gwiniz du,
« Eun teskad kerh, eun teskad segal,
« Hag ' kreiz ar bez eur boked a biz-logod.
« Evelse ' karfen mond,
« Eur pardaez a wengolo,
« Araog ma teuy,
« Er goañv,
« Ar gernez war ar vro... »

C'hwevrer 1958.

En Arvor Douelan

d'am mignoñ Gab ar MOAL

« Den onest, den kaer,
fripou, dogan laer? »

1

En Arvor Douelan 'z eus eur veilh
Eur veilh vihan a val avel
Gand he fevar bann diaskell
He bannou noaz.

2

Gwechall e vale gwiniz gwenn
Ha gwiniz du ha kerh hag heiz;
Ma vije 'r mestr beo hirio an deiz
E valje hoaz.

3

Mez rivinet gand meilhou braz
E yeas eñ da besketa
War eur vag skañv, eun devez goañv;
N'oa ket da choaz.

4

Hag e oe beuzet er mor yen.
Ha war e vez ez eus eur mèn:
« Amañ 'mañ korv Yann ar Meilhour
« Dindan ar groaz.

5

« Maro heb nouenn na pater,
« Eet war-eeun da di Zant Per,
« Pedit evitañ, ma zud ker
« Eur wech ar bloaz. »

6

Ne oa na taer na droug na laer;
Daoust ma lavare e vamm-gaer
Flemmuz he zeod evel eun aer
Ha gwasoh hwaz...

7

Eun deiz m'edo Yann war e lestr
E wreg Soazig dre ar prenestr
A heulias gweliou gwenn he mestr
Ha e roas

8

D'eur mignon all ' pez oa da Yann,
— P'he-dije dleet lared nann —
He bruched rond, mistr ha gwenn-kann
He bruched noaz.

9

Ha darn a doufe el lez-varn
E krougas Yann gand e zaouarn
Ar fripon daonet, al louarn
Evel eur haz.

10

Hag ouz bann izel ar veilh goz
Gand eur gordenn e-kreiz an noz,
O toui warnañ e valloz,
Yann en stagas,

11

Hag a dehas daoust d'an arne
Wardu aochou treitour Groe,
Ha Yann ez-veo n'eo bet aboe
Gwelet biskoaz...

12

En arvor Douelan 'z eus eur veilh
A dro en êr evel eur freilh
Ne valo mui na kerh na heiz
Biken siwaz!

Disput etre ar Mevel braz hag ar Hrennard

d'am mignon A. GUILLOU

P'emañ 'n contr Frañsou war e wele
Taget e zargreiz gand al laerez,
Deus d'am zikour. Te ' zo kole
Ha gouest da drei rod an drailherez
Beterabez.

C'hwi pôted kêr a vez diskuiz
Bemdez azeet war ho pankou;
Ni ' vez dalhmad a-dreuz ar parkou
Ha gleb-dour-teil dindan ar gliz
Pe ar haouadou.

Skarzet ar hraou, berniet an teil,
Pilet al lann, karget ar prezeb,
Hei! Ho! d'ar pont da zoura 'r hezeg,
Ha goude koan ' fichin va freilh
Da zorna 'n heiz.

Kañfard, pa vo dit-te da choaz
Pe micher ' ri da honid bruzun,
Ne choazi ket boud mevel braz;
An huñvre-ze a ro dit rukun
En eur zihun.

— O n'eo ket gwir, ar hontrol beo:
Kentoh eged boud troher-bleo
' Karfen goud ob'r wardro al leueou,
Goud dihleuzia, goud sevel kleuz,
Ha c'hweza er beuz!

Pa vo pare d'an contr Frañsou,
'Vo droed adarre d'ober dañsou;
Hag ouz son drant da vombard, Jakez,
Pa vo tennadeg ar patatez,
Neuze me ' zañso 'vel eul lakez
Gand 'n hini ' garez,
Chann ar vatez!

Here 1958.

An Alhoueder hag ar Big

da eñvor Pôtr JULUAN, person SERVEL

« Bip, bip, bip, na skañv e sko m' askellig! »
'Me eun alhoueder yaouank, yah ha drant,
Ha gand er an oabl glaz meo eun tammig,
« 'R buanna lapous ' hellfen boud, m'am-bije c'hoant;
« Eun druez boud kov-teo, eveldout, merh ar Big! »
« Pa nijez divonn, pounner, euz ar bern teil d'an erv,
« Te ' fell dit nouspegeid da dizoud ar souh-derf,
« ' Zo du-hont ' penn ar park, paour kèzig! »

Evel eun tenn, da volz an oabl eo savet al labousig
D'ober fae war ar big, pa glever souden: Bip, bip!
Hag uz d'ar houmoul ' tiroll skeud eur spoutnig
Mil gwech buannoh 'ged on evnig aonig.
Hag e keit-se, dindan, heb ober van,
Pig 'vel bran a gan: « O, perag mond ken buan?
'Vel ' nije laret 'n ôtrou Person Servel,
Amzer awalh hor bo da vervel! »

Selekt-Sinema

d'ar barz P. HELIAS

Muzig eun akordeon e tavarn ar porz-mor,
Kañfarded-o-revolver war-hed e toull an nor,
Ar polis oh argas torfedourien ar bank,
Ha korv an treitour ru n'e hourvez er poull-fank
Gand eur mell-toull en e vell-kein...
Polezed fichet brao gand arhant brein;
Ar wiski o redeg, ar Packard o fraoñval;
Eur maner kaer ahont krog ennañ an tan-gwall...

« Chokolad-skorn! oranjez!
karamel ha madigou! »
Rag d'an abadenn gaer e tired bugaligou
Pegwir ez eo ar gerent a zibab dim ar filmou.
« Les femmes s'en balacent! »
Evelse bezet grêt!

M'az karan kemend..

M'az karan kemend, koantiz,
E kav din
Eo 'vid ar hevrin don ez lagad du,
Da skruz-skoaz skañv,
Ma ebeul skoemp,
Pa laran dit on beuzet en e zonder sklèr...

P'erruez berr-alanet
Dreist ar hleuz
Redet ganit eun hanter leo davedon,
Hag e hourvezom
War ar flourenn-hañv
Dindan ar helvez en or pradenn hlaz...

O, tav ha selaou! Nann, n'em eus ket echu!
Red eo din kana 'r joa a drid em halon!
Ne dav ma mouez
Nemed dindan ar beh
Pa zeu da ziweuz fresk
Da droha din an alan...

Tango

d'an neb a gar
hag a houzañv
gand e garante

Perag ne lar ar galan
Ger 'bed din-me 'n eur zañsal?
Santoud a ran e alan
O sourra skañv em skouarn.
Moarvad emañ al louarn
E zoñj en eur plah all;
Ha grik ebed ne lar
D'am halon leun a hlahar.

N' hellin ket, sur, lavared
— Ne ran ken nemed krenañ —
D'ar plahig yaouank karet
Eo hi an hini ' garañ.
Ma skiant eet da goll,
Em-eus eur zoñjenn foll:
Gand ma diweuz c'hoant kri
N'he gouzoug gwenn da gregi.

Imor

d'ar barz P.-M. MEVEL

Gwagder an diegi a gwez em oll gwazied;
Vel eoul gand an heol eo teuzet ma empenn.
Lem-lak war ma zamm paper ' stlej ma fluenn
Evel eun loen dihet, skaseg ha skuiz.
Pardévez hañv en dommder voug arneüz
Hag an diegi gwag em gwazied a gwez.

Warlene edo puilh kraoñ-kelve da gutuilh
En disheol fresk gand frond ar stêr
War hent chapelig koz Santez Katell
Euz pardon ar Peniti ' tond d'ar gêr...
Kaouajou glô an hañv gleb-teil
'Deus breinet ar hraoñ-kelve war an brankou.

Warlene a zornadou o skuilhen en he parlenn...
Gand eur pôtr all ar bloa-mañ eo hi eet da bardona.
Soaz-ar-Madigou ' vo war dreujou mein ar chapel
O werza frouez d'an dud, o hopal « pér ha polos! »
Ha goude ar gousperou ' tebrint lod ar pardon
Euz eur zahadig paper a zeg gwenneg.

O, koulskoude, me oar, raog foar Vikêl ' vo faez
Ha heug gand he hrak-ôtrou botou melen.
Ha neuze ' fello dei ganin mond da Geraez;
Med neuze larin nann, nann a-grenn.

'Vel eoul gand an heol eo teuzet ma empenn.
Lem-lak; O, n'ouzon mui. marteze ' larin ya!

Sellou

Sellou du, sellou don daoulagad an itron.
Itron piou? N'ouzon-me; ma hini marteze?
'Vond e-biou, ouzin-me he-deus gand karante
Sellet eur momed kaer, beo ha taer
'Vel ma vije ar bed endro dim eet da ged
Ha ni on daou ken laouen ablamour d'ar gaou
Dizac'het ha difreuzet a-zirag an herr gwirion,
Al lañs a gas an eil daved e bar,
Bet ganet 'n eur bed all en amzer gollet
Stummet an eil evid egile korv hag ene
'N eur burzud kaer — morzed ouz morzed, dremm ouz dremm —
Oh addegouezoud souden 'vel eur flemm
Gand stokadenn vammuz, dous ha lemm
— Luh tomm ha tan ha mel, gwinn fromuz —
Daoulagad pep hini; daou en unan heb grik!

Gwengolo 1954.

'Davedout, evidout... ganid

Pa zeuy adarre broud an hañv
Gand ar garante n' hellin padoud;
Dreist d'ar hleuz ' tilammin skañv
Da redeg, Janed, prim davedout.

El liorz tomm am-bo kutuilhet,
Evid he staga war da vruched,
Eur rozenn ' vo mevuz he santoud,
Eur rozenn ruz, Janed, evidout.

Pa vim on daou en oad priedi,
Eun deiz ' kemerin hent ar Hamfroud,
Kerkent ' vo echu gand ar medi,
O, ma Janedig prim davidout.

Te ' zeuy da vestrez em hoz lochig;
Bugale ' vo mar vez gras Doue,
Me ' vo evuruz 'vel eur roue
'Vel bremañ p' am be eur pokig,
O Janedig, diganit.

1958.

Kanaan

da eñvor P.-M. GEROT, beleg

Ar hirri ' red a-herr gand an hent neve..
Kemerom an hent koz da zantoud alan
Baradoz glaz ar radenn hag ar balan,
Liorz ken kaer ar beorien géz dileve,

Baradoz ar spern gwenn ha per ar werhez
Ha drez a ginnig mouar da Yann-gañfard
Da larda 'n aval trenk eo bet o lërez
'N eur zond euz dastum kistin koad Kerouzard.

C'hwil ' garfe goud an hent d'am baradozig,
Pinvidigeziou mor war grap e gleuziou?
Diskennit ru ar Porzou war ho pouezig,
Gand trei a zeou tu-dreñv ti braz Chann Jigou.

Pa gouez kraoñ mouesk ar bodou war an douar
Eno e tarev 'n irin hag ar mouar,
Eno ' vo puilh bremaig ar histin rous,
E Traonienn zakr ar mel hag al lëz dous.

20-10-1958.

Gwengolo

E liorz braz an aot
E karan c'hwez ar bezin,
Ar gwele zabrenn klouar
Emañ 'n e greiz ar hregin
Dindan eur gwiskad gwenn
Ha skañv a lehid tano,
Morgousket o hortoz
Levenez tēr al lano.

Warlerh eur miz-Eost kriz,
En èzenn sklër ha skañv
Me ' gar al loar 'n he hann
Da hanter viz Gwengolo.
Pa zouz ar mor a-dreñv,
Me ' gar an tréz dizolo,
Pradenn veur strad ar mor
O kimiadi d'an hañv.

Gwengolo 1958.

Gouel an Oll-Zent

d'am Zad ha d'am zud koz

Er vered koz endro d'am iliz-parrez
'Mañ kousket èz er peoh ma oll gendadour
Re baour 'vid kaoud o ano er mein benere
Re baour evid kaoud douar d'o relegou.
Mez ' korn ar vered ez eus eur garnel hwaz
Berniet enni 'vel mein 'n eur vengieuz vraz
Eskern gwenn ar re goz echu o gouel-mikël...
Skultet a-uz d'an nor ez eus eun èl
A zeblant lared din:

« Da dudou koz

« 'Gav gweloh boud gand o hendirvi tostañ,
« O amezeien ger a oa o nesañ.
« M'o anavez e Doue, m'o mir d'Ezañ
« Beteg devez gloriuz ar varn diwezañ.

« Te, pôtr yaouank, a gav dit boud eur maout
« War droad da redeg; tad-koz da dad pa oa pôtr-saout
« Da redeg er pardonioù oa treh dit kalz.
« Ne laran ket n'eus ennout danvez barz;
« Pastian da dadiou kant vloaz ' zo
« A zave kaeroh soniou, ' vesa 'n deñved,
« A gane soniou dispar war ar plasou,
« Pe 'n eur vale d'ar gêr euz Santez Anna Wened.
« Mez an traou kaer dispar 'n e benn difuket
« Ne vezent ket 'vid-se dre skrid dastumet;
« Gand plijadur e nesañ ' veze pèet;
« E oberennou kaer ' zo bet ankouët
« 'Vel ' vo da re, den kêz, daoust m'int bet moulet.
« Pa dro an amzer eskern gwenn da ludu,
« Penoñs e padfe 'r paper a zuez hidu?

« Koulskoude ' klevan da dud koz ' tivizoud
« Hag ' hellan lared dit ' vouzhoarzont warnout
« Ha gwech ha gwech e laront — 'n eur hegi da dad — :
« Da vab-te, Jañ, a teus-te desket mad.
Ar brezoneg ' deu gantañ zo disterig,
Mez goud a ra el lenn ha skriva sklêrig.
Mar vijes-te, pôtr Jañ, bet war ar studi,
An traou az-pije kanet ' vije eun dudi,
Ar pezh a dlefem goulenn digand Dreo
Eo selaou 'r zoniou kaer a ganom-ni,
Ar re ' ganem gwechall en eur vond da Goad-Freo,
Hag e karfem ' tiskennfent 'n e skouarn,
'N eur han burzuduz din euz eur Houlouarn. »

Skultet a-uz d'an nor ez eus eun èl
A zeblant lared din:

« Poent eo dit kanañ

'Vid kaoud digemer mad 'touz ar re gosañ,
N'eo ket ken hurr-ze ken da ouel-mikël! »

Gouel an Oll-Zent 1958.

Poeme Boemuz !

d'am Gwreg

Un ha daou zo teir, un ha diou zo tri.
Me zo fached gand ar sifrou, gand ar jedi.
Me ' lak niverou war gainerou penn ouz troad,
Oll penn ouz reor, meskig-meskog, rampig-rampog.
Kollet ma hent, kollet ma hont, ran netra vad.
Mez n'eo ket red din gouzoud jedi mad na fall,
Pegwir oan krouet 'vidout en eun amzer all,
Hag out jederez algebristez euz an dibab,
Ha me da c'hoari gand ar sifrou eun inkapab.
N'eus forz na foutre, na lorh na foug, na mez da-houde,
Na keuz na beuz na tribunal na tricolor,
N'eus netra ' gont er gont-mañ a garante
'Med un hag un zo daou, amo, amor;
Ha te am-bo ha me ahanout ' pad on buhe:
Ambo, on daou, Rozenn ha Laou, brava bravo,
E pad on buhe, deg vloa, kant vloa, kont te goude!
Va hoñchenn foll, eilpenn dibenn, diboell, diboell,
Evidout-te hellfen hurrad beteg an de
'Vel huñvre kaer eun hurr a nozvez biche-bell
Rag an orolaj ne verk hwaz 'med teir eur deg.
Teir? deg? Teirzeg pe drizeg? Kerzed trezeg al loar..
Te ' gred on ' sodi-pitilh? pitit' je t'aime, te oar,
E galleg ha brezoneg: me da gar! Boñsoar!

Miz Du 1958.

Mor ha Tir

d'am Gwreg

Evidout e oen ganet en douarou;
Evidon ' oes-te ganet e glann ar mor.
Penoñs dreist d'ar menezioù, dreist d'ar steroù,
Dre vuzud e tigoras dim eun nor?

Evidout on ar mêzioù hag al lann;
Evidon out ar mor en heol splann.
On daou ved paour n'int 'med hanterioù fall,
Dineuz, dibar, an eil heb 'n hini all.

E donvor da garantez on diskennet,
E prajou va yaouankiz e-teus lennet
Nerz va harantez 'vito hag evidout,
Oaledig va zeg vloaz ken splann dirazout.

Setu n'eus ken baradoz 'vidom daou
Na vefe ennañ 'n aot e penn ar hraou,
Kan an avel er wern hag al labous er sporn
Eveldom unanet e donder or feiz.
N'eus ken baradoz 'vidom 'med e Breiz!

31 Here 1958.

An Imbouder

da Yeun ar Gow

P'oan kañfard, ' soñje din, ar brava micher,
A vije boud imbouder gand eun noter.
Pa vez torret ar feurm da Ouel-Mikêl,
Distlabezet ar grignol, ha pêl-mêl
A vez skubet teñzorioù a vez gwerzet beb eil,
Kentoh eged o devi pe o zeurel d'an teil.

« Piou ' lak hemañ e priz? Trizeg real,
Pevarzeg, c'hwezeg, triweh, ugent real...
Arabad ' zaou skoed n' hell ket mond!
Arsa, merhed! grit mad ho kont:
Er marhad koustfe tost da dri-ugent lur.
Tri skoed ha deg 'm eus gwerzet unan, sur,
Ne oa ket koulz hag hemañ.

Marianna!

Ar zoubenn vad ne dle ket boud divlaz.
Eur chipod-holen, unan skultet hwaz!
Pegemend lakit ennañ? Pemzeg gwenneg!
Biken! Biken! Grit ho soubenn gand ho ploneg!
— Lard-sall, me gred, zo mad awalh evidoh
A-zibilh ouz an treust e c'hwezigeall ar pemoh!
— Eiz real! eur vez a ve! ' priz 'mañ ar beuz!
Hastit, plahed, bremaig ' po keuz.
Eur wech, diou wech... 'hanta! 'mañ ' vond... prest oh?
Den ne lak mui? Sur mad? Tampividoh!
Dal! diou wech hanter, teir, fripon, dogan, laer,
Gwerzet eo!

Ma zud vad, sellit hag e welfet:
Eur gaoued gaer alaouret; ' ran ket goap.
Al labous a oa ' barz n'eo ket nijet d'an oabl,
Al labous, a oa barz, a gan e kov eun targaz —!
'Noa digoret an nor — ar hizier a zo ganas —!
Labous pe dilabous, ar gaoued ' zo koulz ha neve.
Bez 'z eus laboused all ' gar beva euz o leve.
Eur skoed a dalv mar dalv eur gwenneg toull.
Hastit, tudou, rog ' koueo an ti 'n e boull!
Hastit, tudou, n'eus ket eun dousenn all!
Ma Jezuz! Grik ebed? Ar henwerz a ya fall!
Bremaig ' vo red dim prena toud, an ti hag all,
Me hag an noter. O, ne vo den trist:
'M-eus gwenneg war ma ano.

Eur banne jist

' Rafe ket droug din. Bennoz! Plah an ti!
Mar vijen pôtr ' yafen d'ho saludi
'N eur vond da verheta; na petra 'ta!... »

Garan ket kemend ken, ma mignon an imbouder
A dôl 'velse d'an avel en disparti
An traouigou oa beo 'trezo ene an ti.
D'ober d'an dud ankouâd eun dra ken gwirion
Eo red da beb imbouder boud istrion.

Miz du 1958.

Burzud an Nedeleg

d'Ac. 'n Eskob V. FAVE

De rôg Nedeleg om eet joaüz
Evel beb bloa da gerhed
Deliou ivi, man ha gargel
'Vid Kraou ar Mabig Jezuz.

Burzud Nedeleg evel boaz
Diragom 'zo hoarvezet:
Kavet on-eus e-tal ar groaz
Teir bleuenn-hañv digoret.

Laouen ni ' zoñj 'n eur gerzed skañv:
Pa gaver bleuñ er gwasked,
Pehed eo lared « Deut ar goañv »,
Larom « mañ 'n hañv o kousked! »

etre Chartres ha Versailles
etre 5 eur ha 6 eur eus ar mintin.
19 Here 1958.

An Torh Kaz

gand

Reun Menez KELDREG

Anavezet mad am-eus Marianna.

He mab, Per-Din, e-noa ma oad, pe demdost. Aliez en em gejem,
pa 'z eem, gand friou-kreïenn all ar Brenn. d'ober lañs d'on nijere-
zed-losteg da dal milin-avel ar Goff, war gorre run Merroziou, dirag
bae Gwaien.

Soñj mad am-eus hoaz euz an devez ma zeuas an Aotrou Maer
da gas kelou dezi euz maro he gwaz, Jos Kerraveg, bet beuzet e Tou-
lon.

Kelou ar maro-ze n'e-nije ket marteze merket ken don em spe-
red, ma vije bet kaset, vel meur a hini all, gand paotr al liziri pe
gward ar parkeier, pe hoaz gand eur maltouter bennag euz Gwaien,
pe zoken gand ar Siñdik. Ar re-ze a oa evidom tud boutin evel on
tud, peogwir e welem anezo tost bemdez, ha se daoust d'o habellou
pe d'o gourizou ler. Med gweloud an Aotrou Maer oa eun afer all.
Maer ar barrez, d'ar mare-ze, oa alvokad ha Kannad er Gambr. Eur
wech an amzer e tileze Pariz pe Gemper evid dond da renta bizit da
« chas Plozevet », evel ma oam anvet gand tud tro-war-dro. Ma ne
vije gwelet nemed awechou er vourh, ne deue morse, koulz lavared,
beteg treviou ar barrez. Evidon, n'am-oa nemed spurmantet anezañ
eur wech pe zious, deut ma oa da zaludi or mistri en ti-skol.

Abaf e chomjom an devez-se, pa weljom anezañ o herzel e-
kichenn or bagad, hag o houlenn diganecom peleh e chome an itron
Kerraveg. Per-Din a oa aze dres hag ez eas d'ambroug an Aotrou
Maer betek ti e vamm.

Iskiz-tre e c'hoarvezas an darvoud gand Jos, hervez ar pezh a
glevis an dud o konta en deveziou war-lerh. E merdeadurez Bro-Hall
e ree e vicher, ha gounezet e-noa, d'ar mare a lavaran, e haloñsou
eil-vestr, pe eun dra bennag e giz-se. Eun abardaevez, dao dezañ
badezi ar zardined nevez gwriet war e vilginou, e tiskennas d'an
douar, gand pevar abostol all evid eun dro lard en ostaleriou. D'an
noz, en eur zistrei d'o bourz, evet ganto kalz muioc'h eged red, e savas
eur menoz diod e penn or bigoudenn. En e zav er hanot, en em lakeas

da hoari an droch, eun troad war vabourz, unan all war drebourz, evid rei lañs d'ar vag, d'he lakaad da vranisigellad. Farsuz ! Kea !

Ken farsuz ma splujas d'an dour ar pemp galoñsed, ha d'o heul an daou vartolod deut d'o hemer war ar haë. An daou-mañ, diwar zour, a zeuas a-benn, goude kaer vallozi. da bignad er vag ha da besketa ar Vestrañs... war-bouez unan. Kaer o-doa bet furchal en eur sklêrijenna an dour gand letern ar wern, chomet n'ouzon penaoz war enaou, ne weljont na roud anezañ na bouilh war e-lerh. Doanias tra, ne oa ket kavet goude, hag emañ hoaz er strad, o konta d'ar pesked mud envorñnou kaer e vro, ha penaoz e ouie Marianna Vigourouz, e wreg, farda youd ken mad.

Setu penaoz ha perag e teuas Marianna da veza intañvez.

Bloaz pe zaou e kendalhas-hi da zerhel ar verouri he-doa duze e Merroz-an-Traon. Adaleg neuze ar Gouarnamant a zegemeras he mab e skol ar voused e Brest, hag a roas dezi eur bañsion. Gand seurt dornad a voneiz, Marianna a brenas eur raouennad douar war vord an hent braz, etre Lestrougi hag an Ti-Lonk, hag a reas sevel war-nañ eun ti bihan.

Aze e vevas, diwar he liorzic, he yer, he fañsion hag he glahar, o c'hortoz pare gouli he halon ha distro he mab, eur wech an amzer. Beb a dammig koulskoude, an hent braz a rede dirag he zi a gompezas he ene. Du-ze, e Merroz, n'he-doa nemed sevel he fenn diwar he labour evid gweloud dre he frenestr ar mor o lintra. Hag ar morze, rust pe habask, a zedenne heb ehan he zoñj war an hini a ruilhe e plegou e vantell yen. Amañ, ne wele mui an dour, ma kleve hoaz e zafar, d'an noz dreist-oll, pa hwitelle ar gorventenn en-dro d'he zi, o kas beteg enni braouah an tarzou o vernia bili war aod Tal-Men-Hir.

Bubez an hent, nevez eviti, o tremen beb ar mare dirag he frenestr, a lakeas goustadig ar peoh da ziskenn war he ene, ken na zeuas d'en em blijoud, hag erfin da gavoud berr awalh he amzer. Kalz berroh e gavas hoaz adaleg an devez ma reas Gaid Kervinou sevel eun ti par d'he hini, dres en tu all d'an hent.

Intañvez a vrezel a oa Gaid. Mab ha merh a jome ganti pa varvas he gwaz. Dimezet he mab, Gaid a lezas gantañ ar stal, war gont dezañ da zevel eun ti dezi ha d'he merh, war vord an hent, e park an Durumell, a zalhe ganti evel herez da Zoazic, he flah yaouank. Homañ, nevez dizroet euz ti seurezed Pont 'n Abad, leh he-doa desket brouda, en em lakeas da labourad evid ar merhed tro-war-dro. Hag ar re-mañ a zeuas buhan da voaza ouz he labour. Pañsion ar vamm, brouderez ar verb, a zeue a-benn da lakaad ar jidouarn da domma, hag eun drailhenn gig dindan he golo eur wech an amzer.

Gaid ha Marianna a reas buhan anaoudegez ha dond a rejont

da veza diou vignonez gand ar bloaveziou. C'hoarezed, me gred, n'enije ket gallet beza sevennoh, hegaratusoh, aketusoh an eil e-kenver eben, o 'n em renta servichou bihan, 'vel ma oar henn ober ar merhed deut war an oad, p'emaint troet war an tu dehou.

Eur blijadur oa gweloud anezo, an diou goz oh ober stamm, an hini yaouank o vrouda, azezet a-gevred war leton glaz bord an hent, e disheol eur wezenn evleh da zeveziou bero an hañv, pe bodet e goudor klouar ti Gaid d'ar goañv, abalamour d'ar praktikou, en o hichenn eur jaftalenn, he reor e-pad an deiz el ludu.

Bloaveziou e renas ar vuhez sioul-ze etrezo, hag he-dije padet beteg kreiz o hozni, ma ne vije ket deut an Torh Kaz du milliget da renta bizit dezo.

Eur mintinvez e tigouezas.

Heol klouar miz Mae a bare war eur bed en e splannder, fichet meurbed ha yaouankaet gand glazder ar gwez, freskder ar peuriniere hag ar brousgwez. Ar hleuziou ha leton ar parkeier goloet a vleuniou oa eun dudi d'al lagad.

An diou vaouez a zistroe war o fouezic euz an Ti-Lonk e-leh ma oant bet o prena ispisiri. Kaoz vraz oa ganto, lirzin o diou en heol tomm. Eur mousavel gompez a floure o bizaj en eur lakaad o lasennou da zarnijal en-dro d'o fenn. A gammedou skañv e tostaent ouz o zier, war o chaosonou, pa weljont anezañ, azezet war gab e reor e-kreiz an hent, o c'hortoz anezo, e vije bet lavaret. E zaoulagad a bare warno, glaz-aour e bannou an heol.

An diou vaouez a harzas dirazañ. Ne finve ket.

— Sell outañ 'ta, Gaid, eme Marianna. Lavaret e vije 'mañ o vond da gomz.

— Ya ! a respontas Gaid. Biskoaz seurt ton gand eur haz !

— Da biou e hell beza ?

— N'ouzon ket ! N'am-eus ket soñj beza gwelet anezañ nebleh.

— Na me kennebeud.

— Unan bennag a houlenno anezañ sur awalh. Ni a lavaro en Ti-Lonk eo bet kavet ganeom.

O diou, mud, a jome da zelled outañ. Heñ, ken mud all, a zelle outo.

— Bich ! Bich ! a halvas Gaid a-benn eur pennad. — « Miaou ! » a respontas ar haz. Bazailha a reas goude en eur zizoloi eur renkennad dent gwenn-glaz, hag en eur drei en e henou eun teodig ruz-moug. Goude e savas, en eur gemer e amzer. Kroumma a reas e gein, astenn unan euz e baviou a-dreñv, hag an hini all goude.

Sevel a reas e lost a-bik war e reor, ha dre gaerig e teuas d'en em frotta ouz o divesker.

O fennou stouet warnañ, ar merhed a vousc'hoarze.

— Mignon eo ! eme Gaid. Ne dle ket beza koz, daoust d'e vent.

— Eur hratrig eo ! a respontas Marianna.

— Kasom anezañ d'an ti.

— N'eus ket an êr da gaoud naon.

— Eur bannah laez a yafe gantañ marteze.

— Mëndare eo logoter ? a lavaras Marianna a vouez izel, evel dezi he-unan.

— Logod zo 'n ho ti 'ta ?

— Nann 'vad ! Nemed c'hwez eur haz a zivenn outo da zond.

— Ma ! Me gemero anezañ memez tra, eme Gaid. Evid ar boued a yelo gantañ !

— Nann ! N'eo ket evid ar boued. Din a rafe plijadur ivez, rag me 'zo atao va unanig em zi hag eul loenig evel hen a lakafe ahanon da gaoud kalz berroh va amzer.

E-pad an amzer-ze ar haz a gendalhe d'ober allazig d'o divesker.

— Bich ! Bich ! a halvas Gaid. — « Miaou ! » a reas ar haz.

— Bichig ! Bichig ! a lavaras Marianna. — « Miaou ! » a respontas al loen, troet daved an hini a halve anezañ.

Hag e azezas dirazo, beg e lost dastumet etre e vorzedou, eur roñroñ kreñv o tond euz don e gorzailhenn, en eur zevel warno e zell gwer-aour.

Gaid a gilas war-du he zi en eur helver anezañ. Trei a reas e benn, ha goustadig e savas. A gammedou voulouz e voulhas penn an hent war he lerh. Greet gantañ pemp pe hweh paz, e savas keuz gand Marianna ouz e weloud o heulia he mignonez. Avi he-doa outañ kenañ-kenañ :

— Bichig ! Bichig ! a hopas hi. Deus 'ta, bichig bihan !

Ar bichig a droas e benn hag a harzas, evid azeza a-nevez e-kreiz an hent.

— Lez 'neñ 'ta, Marianna, eme Gaid. Oa ' tond ganin !

An eur eo a lakeas anezou da deurel evez e trouz karr Beg ar Raz o tiboufa e korn-tro Lestrougi, ken boazet ma oant da zelloud beb mintin ouz an orolaj evid gouzoud pe oa diwezad pe get. E spered Gaid, koulskoude, primoh marteze, e paras eur zoñj all. Eur pennad tiz a gemeras daved al loen. Soubla a reas warnañ, krabanou digor, d'e zamma dre grohenn e gein. Hag ar haz war bleg he breh.

— Deus 'ta, drochig ! a randone-hi outañ, en eur biltrotad war-

du he zi. Paneved-se te a vo friket gand ar mell hini-ze. Henez zo pounner, te oar ! Me 'zo 'vond da rei dit eur bannah laez.

Marianna a jomas digor he genou war nav eur. — « Bichig ! Bichig ! » a zeuas a-benn da helver, eur pistig en he halon hag eun dakennig dour e korn he lagad.

— « Miaou ! » a glevas, vel eur respont klemmuz ha truezuz d'he galv, pa zeue warni ar harr, e gorn o vlej, e starderez o youhal, ar blenier o hopal, pennfollet, o weloud an diodez-se o chom vel eur peul e-kreiz an hent, dindan rodou e wetur.

Feuket, he halon o tarlammad, muioh, me gred, gand an aon da veza bet friket eged gand kasoni ouz he mignonez. Marianna a gilas, prim an taol-mañ, war du he zi, hag a stlepas an nor war he lerh, kounnaret.

Adaleg neuze e trenkas ar zoubenn.

An devez warlerh, Marianna, mintin mad, a zistroe euz an Ti-Lonk. Soazig, dre he frenestr, a welas anezi o tond en-dro.

— Marianna a zo eet da gerhad bara heb dond da houlenñ ganeom pe on-noa ezomm euz eun dra bennag ! a lavaras-hi d'he mamm.

— An dra-ze ne ra netra, eme Gaid. Marteze oa prez warni ar mintin-mañ. Me yelo bremaig da gemer pezh a fazi.

Ar verb a gendalhas gand he labour. Beteg an noz ne weljont ket al liou euz ho mignonez, heb teuler, gwir eo, kalz a gont war gement-se, ken dalbet ma oa ar vamm e-doug an devez gand ar haz o c'hoari en he hichenn er gambr. Kement a reuz a ree awechou, ma chome ar plah yaouank da zelloud outañ, en eur hoarzin leiz he genou, perlezennou he dent o lintra etre voulouz moug he muzellou, pa zeue al loenig, en eur riskla war ar planchod gwerniset, da ruilhal etre he divesker.

Antronoz vintin, Gaid a zavas primoh eged boaz. He merh, dibunet gand he filpasou, a houlenñas diganti :

— Emaoh abaoe o vond da zevel, mamm ? Ped eur eo 'ta ?

— C'hweh eur bennag, emic'hañs ; n'am-eus ket mui c'hoant kousked. Chom hoaz 'barz da wele, te ; me ya d'an Ti-Lonk.

Pa oe adkousket he merh, Gaid a ziskennas er gegin. Laez a ginnigas d'ar haz da genta, en eur voumouna anezañ 'vel eur bugel. Goude e roas eun taol-skub d'ar gegin. Lakaad a reas he hoefou ha samma he zah evid mond da brena bara da lein. Dre gaerig e tigoras an nor hag he zerras war he lerh gand kemend a aked. Goude, 'vel eul laer greet gantañ e dorfed, dre an tirienn, en eur vouga en he gouzoug eur hoant nerzuz pasaad, e kemeras penn an hent. Dre ma

'z ee, he halon a zaoulamme. Pistigou a zante en he houstiañs evid ar pezh a ree d'he mignonez. Mez he-doa. Pa zistroas d'he zi, ne zavas ket he daoulagad war-du ti an hini all, daoust d'ar stalafiou da veza hoaz prenet.

He merh oa war zav, tommet ganti ar hafe ha prest d'azeza ouz taol. Gaid, atao tregaset gand he menoziou, a zistagas, en eur zigeri dor ar gegin, eur mell taol troad ouz plad ar haz, hanter leun a laez, ken a lammas a dammou dindan an armel.

— Dal't, emezi, 'mañ riñset! N'am-oa ket a zoñj ken euz an torh-kaz brein-ze! Peleh 'mañ?

— Piou? Ar haz? a respontas ar verb en eur lakaad he dornig war he genou.

— N'az-peus ket digoret an nor 'michañs! a hourdrouzas ar vamm.

— Ya 'vad! eme Zoazig. Bet on bet el liorz, ha lezet am-eus an nor digor, amzer din kas an traou 'poa skubet d'an toull teil.

— An amprevan-ze 'zo eet er-mêz!

— Dond a raio en-dro pa 'no naon! Hennez 'zo el liorz, sur awalh.

Ar vamm ne glevas ket; el liorz edo, o hervel « bich, bich! » leiz he genou. En aner!

Soñjet he-doa dioustu da beleh e oa eet ar haz, kollet eviti.

**

Dond a reas en-dro, koulskoude, tri devez warlerh. E-doug an tri devez-se Gaid a durlutas dre an ti, vel m'he-dije bet spilhou en he reor.

— Chechu! Chechu! a brozmole-hi etre he dent. Rag ma lezo he dor digor!

E-pad an heveleb amzer Marianna a oa chichantaet. Sebezet e chomas ar mintinvez ma klevas o viaoua dirag he dor. N'he-doa ket kousket mod netra, mezekaet ma oa outi he unan pa zoñje penaoz hag evid petra e oa mouzet ouz he mignonez an devez araog. Ken a vouse'hoarze en eur lakaad he hoefou war-dro seiz eur hanter. En em hourdrouzet he-doa he unan, ha felloud a ree dezi beza prest mintin mad evid galloud mond da di Gaid, eur wech digoret ganti he stalafiou, da ginnig dezi ober eviti he frenadennoù en Ti-Lonk. Eur goumoulenn ne vije bet ken war o mignonez donedigez an torh-kaz.

Ya! Ne ouie ket neuze e oa an diaoul e toull he dor!

Pa glevas ar « miaou », he halon a zaoulammas. Krib, dirouest-leraz, spilhou hag all a stlepas war an daol, ha d'ar red da zigeri he

dor. Heñ oa! N'he-dije ket kredet! Paka a reas anezañ, starda war he halon, ha buhan ez eas gantañ d'ar gegin. En eur grena gand ar blijadur, e tiveras evitañ eun hanter muzuliad laez en eur plad. E-pad ma selle outañ, he daouarn kroazet war he barlenn, e nijas pell-pell euz he spered pezh a zivize bremaig e-keñver he mignonez. Edo ar haz en he zi! Laouen ar vaouez'.

**

Daou devez goude, war dro pemp eur hanter euz an abardaez, gwerzet ganti eur rumm koefou plên da vestrez Dinaou evid mond d'eun interamant da Laban, Soazig a gemere evel boaz eur bannah kafe d'he merenn vihan. Edo he daoulin war an daol, ar volenn savet etre he daouarn, o rambreal, kollet he zellou war n'ouzon pe ved diweluz, pa harzas en eun taol da vousekana. E ti Marianna, dirazi, eun dra iskiz a denne he devez.

Eun dra bennag du a fiñve etre ar gwer hag ar ridochou, o lakaad ar re-mañ da grena. Selloud a reas pisoh. He haz! He haz o klask paka kelienn gand e baviou a-dreñv ar gwer en ti all!

— Mamm! a halvas-hi. Deus da weloud 'ta! N'eo ket kollet ar haz! Mañ du-ze e ti Marianna. M'e 'zo o vond d'e gerhad dioustu.

— Nann! a respontas ar vamm, krak.

— Perag? eme ar verb, sabatuet, dreist-oll gand ton ar respont.

— Mad 'mañ du-ze! Dond a raio en-dro pa garo. N'eo ket dao mond da glask trouz abalamour d'eur haz.

— Trouz? N'eus trouz ebed da gaoud peogwir eo deom.

— Kemend eo da Varianna.

— Ne gomprenan mui netra! C'hw'i 'peus lavaret din ho-poa kavet anezañ an devez all war an hent dirag an ti.

— Ya! Sammet am-eus anezañ pa glevis karr Beg ar Raz o tond. Med sur awalh hi e vije bet laouenn d'e gaoud ivez.

— Hag abalamour d'an tamm kaz brein-ze eo emaozh mouzet abaoe tri pe bevar devez?

— Me n'on ket mouzet!

— Ne zellit mui ouz Marianna, hag amañ en ti e ranker tenna ar homzou euz ho kenou!

— Me 'zello outi pa zello ouzin.

— O, Mamm, evid eur haz!

— Hi an hini a zo mouzet! Piou a zo eet da genta d'an Ti-Lonk heb goulenn netra diganeom? Mad e-giz-se! Peb hini en e di, didrousoh 'vo an traou.

Hervez c'hoant ar vamm e oe greet. Soazig, mezekaet gand meno-

ziou diod an diou vaouez a drohas berr, evid kaoud ar peob, da zarem-
predi Marianna.

*
**

Miz Mae, miz Even a dremenas. Gouhere a oa boulhet hag an
traou a jome atao en heveleb stad. Evel diwar eun emgleo, o-doa
kemeret an diou vigoudenn boaziou nevez. Beb eil devez ez eent d'an
ti ispisiri. Pa zeue unan war dreuzou he dor, eben ez ee d'he zi pe
a gerze d'he liorz. Pa 'n em gejent war an hent, unan a zelle wardu
an neñv hag eben ouz beg he botou. Pa 'z ee Marianna d'an overenn
vintin. Gaid a hortoze an overenn bred. Pa zigore houmañ he fre-
nestr, an hini all a denne he ridochou.

Hag ar haz ? Dre ar prenestr pe dre an nor, dre ar gloued pe
dre ar harz, e kave an tu da jeñch ti pa gare. Buhan e teuas da veza
lard, diwar ar meuziou dibabet evitañ en daou di. Laez dienn-hag-
all, kig euz an tenera a zebre ken aliez ha bemdez. Ar higer a jomas
souezet, o weloud an diou vaouez o tond da veza pratikou ingal d'e
stal-karr-dre-dan. Araog e kemerent gantañ beb sadorn eun tamm
kig leue bennag da rosta er jidouarn. Eun devez Marianna a reas sin
dezañ da herzel dirag he zi, hag a houlennas eun tamm bistek, unan
tener. Tamall a reas eun dant laosk, evid kaoud unan euz an dibab.
Ar haz eo a lipas e vourrou diwarnañ, Marianna baour n'e dañvas
ket. Re ger oa seurt frikou eviti. Daou zevez diwezatah e oe prenet
eun tamm all.

E-pad an amzer-ze Gaid a oa o hortoz al loen. Kaer he-doa
lakaad beb mintin eur pladad laez fresk dirag he dor, netra ! Ne
zeue ket d'e hwesa !

Ar paour-kêz plah, ankeniet oll, en em houlenne petra a ree
eben evid derbel ar bichig keid-all ganti. Staget e oa, sur awalh !

— Lezit anezi ganin ! e soñje. Ma lak hoaz e baviou amañ,
n'ema ket hi prest da weloud al liou anezañ. Me e grougo kentoh !

Pa harzas karr ar higer evid an trede gwech dirag an ti all, ar
wirionez a lammas en he spered evel eul luhedenn. D'he merh en em
glemmas, antronoz vintin :

— N'eus amañ nemed soubenn ar rouz, avalou douar plusk-
hag-all, keusturenn blên ! Me a garfe kaoud eun tamm kig bennag
eur wech an amzer, evel en tier all. N'eo ket abalamour din, med te
a zo yaouank, ha da labour a zo tenn.

— Tenn va labour ! eme ar verb. E pe zoñj emaoz ? Boazet
om da gemer kig da zul. War ar pemdez ne vije nemed drouzivia
moneiz.

— Ta ! Ta ! Ta ! Kig a vo ! a drohas ar vamm.

El liorz e oa dija, o hedal karr ar higer.

Fri tano ar haz a zantas c'hwezh ar hig. Pa zigoras Marianna

he frenestr da lavaroud da vlenier ar harr n'he-doa ezomm netra, ar
haz, dindan he fri, a lammas er-mêz. Ha d'ar piltrot d'an tu all
d'an hent.

Kenta tra a zantas Gaid oa taoliou tourt ouz he divesker :

— Bichig sod ! Loenig droch ! a hourdrouzas hi, en eur lakaad
he hrabanou warnañ. Deus ganin 'ta, kazig ma halon !

Buhan en em dennas kuit, goude beza kemeret he zamm kig,
he dor a zigoras en eur ziskrognal, hag he stlapas war he lerb, eur
hoarz didruez en he lagad evid Marianna baour atao e-kreiz he fre-
nestr digor, mantret.

— C'hweh devez ! a randone.

Buhan e klaskas eur siflenn hag e stagas an torb-kaz er gegin
ouz pao an daol.

*
**

C'hoant eur vaouez n'eo ket bubez eur haz.

Ar hizier, evel her gouzer, o-deus ezommou pemdeziog. Hemañ,
d'an abardaez, a fellas dezañ kaoud digor. Tost d'an nor, e benn
savet daved ar morailh, en em lakeas da viaoua.

— Hennez e-neus ezomm da vond er-mêz, mamm ! a lavaras
Soazig. Digerit an nor dezañ 'ta !

— Ya, dioustu, eme ar vamm.

Kas anezañ d'al liorz ? Ha ma 'z afe kuit ? Klask a reas eur
hased; goude e turlutas er fornigell betek kaoud ludu awalh d'e leu-
nia. E-pad an amzer-ze e komze flour ouz he haz, evid e lakaad da
jom sioul. E zamma a reas hâg e lakeas brao e-touez al ludu. En aner !
Ar haz ne oa ket digor e skouarn vad, rag ne ziehane ket da ziskrapa,
ken na oa ar gegin leun a fulloh. Kaer he-doa e bedi ha maha warnañ,
an torb-haz ne ree van. Ha ma viaoue araog, bremañ e vleje.

Ar verb a hopas :

— Digerit an nor dezañ 'ta, mamm ! 'ma ' vond da zaotra an
ti !

Gaid a gemeras eur siflenn, ha goude beza greet eur skoulm-
martolod en-dro d'e houzoug, e kasas anezañ ganti d'al liorz.

*
**

Erfin e teuas ar haz da veza pal bubez an diou vaouez. O spered
a oa leuniet gantañ, ha bemdez e klaskent an tu d'e zelber en o zi.
Ne blije ket dezañ tamm beza staget, hag e vleje leiz e gorzailhenn,
ken na vije laosket da redeg, ha neuze, kounnaret, en em guze dindan
an armell pe ar fornigell. Kaer e oa e helver, kinnig dezañ laez pe
gig, netra ! Mouzet e chome ha ne 'n em ziskoache nemed pa wele
an nor o tigeri.

Eun druez oa gwelet an diou vaouez o temzigeri dor o hegin, awalh hebken dezo da dremen en eur ober kov moan. Al loen koulskoude a oa beb tro lijerroh egeto : amzer klask stanka an toull gand o divesker, hag e oa tremenet an amprevan evel eur voulienn zu etre o zreid.

Dond a reas da gemer boaziou fentuz. Kerkent ha ma kleve trouz karr ar higer, en em lakee da viaoual a-bouez penn betek kaoud digor. Skuizet gand eun aneval ken penneg, an diou vigoudenn e leze da vond war-dro nav eur vintin, pa groge d'ober e reuz. Neuze, goustadig, a gammedou voulouz, en eur vrasigella beg e lost, ez ee d'azeza e-kreiz an hent da hortoz karr ar higer. Ha gand eun êr a zoujañs e heulie ar vaouez he-doa prenet kig evitañ. Beb eil devez, pe war-dro, e cheñche ti.

**

Eun devez e oe Marianna prest da zempla.

E korn pella al liorz en em winte daved an neñv eur pikol gwezenn bupli, bet plantet aze eun daouzeg bloaz bennag araog gand he mab, a felle dezañ kaoud gwez en e liorz. Gand he gwriziou en douar mad, pe marteze war eun andon bennag o redeg dindan al leton, ar blantenn a oa deut da weza eur mell gwezenn. Ar garenn anezi a zave bremañ sonn ha tevoh eged korv-braz eun den.

An devez-se, ki an Drezen, o redeg dre ar parkeier, a dostaas ouz ti Marianna hag a dreuzas ar renkennad lore berr a oa oh ober garz etre al liorz hag ar maezou. Edo dres aze ar haz oh eveziata laboused. Ar hi, pa welas anezañ, a gemeras eur pennad tiz ruz. Spontet, ar bichig a lammas betek ar wezenn, ha buhan e lakeas e skilfou da labourad, evid skrapa e benn a-dreñv euz dent e enebour daonet. Chalpadennou ar hi, tuferez ar haz, a zedennas Marianna er-mêz euz he zi. He halon a reas eul lamm pa welas an tamm lorgnez ki en he liorz. Paka a reas eun drojenn en he heuneudeg, redeg adarre d'ar jardin, ha kenta tra a zantas ar hi oe eur mell taol baz war e benn a-dreñv. Heb goulenn e rest, e dennas gantañ e baviou, en eur jeñch ton d'e ganaouenn.

E-pad an amzer-ze, ar haz a oa pignet betek skourrou kenta ar wezenn. Aze e chomas azezet, strafuilhet, gand eur zell aonig war e enebour o redeg bremañ e-touez ar melchon. Dinehet eun tammig, en em lakeas da bilpasa war e skourr, ha da glask an tu da ziskenn. Med uhel-uhel oa evitañ seurt solier, ha kaer e-noa trei ha distrei, ne zeue ket a-benn da gemer e lañs.

En traon, he beg digor, Marianna a oa o selled outañ, o hervel, o klask rei kalon dezañ gand he homzou. Netra ! Re uhel en em gave. E vestrez neuze a yeas da gerhad d'an ti eur gastellodennad laez, he astennas a-hed he breh en eur hervel : « Bich ! Bich ! »

« Miaou ! » a respontas egile. Digalonekaet hag eet skuiz o sevel he breh, Marianna a lakeas ar gastellodenn war an tevenn hag a zistroas d'he zi. Ne helle ket padoud. Beb ar mare e teue war dreuzou he dor da helver al loen, atao o viaoual er wezenn.

En tu all d'an hent, o kleved kemend a drouz. Gaid he-doa digoret he frenestr :

— Ma n'eo ket mez ! emezi a vouez uhel, ober kemend-all a vizer d'eul loenig paour. Allaz ! Allaz ! Terri a raio e houzoug an taol-mañ !

Marianna a droas kein hag ez eas d'he zi, kounnaret. Stlepel a reas he zavañcher war daol ar gegin, banna e botou koad ouz ar speurenn er pondalez, ha war he chaosonou, tiz warni, kuit a-dreuz ar parkeier betek Menez Kerveilhen. Nebeud goude e oa erru en-dro, mous an ti ouz he heulia, eur skeul gantañ war e skoaz. Heb koll amzer ar paotr a harpas ar skeul ouz ar wezenn, ha lijer evel eur marmouz, a bignas betek ar skourrou. Samma a reas an tamm kaz fall, ha d'an traon.

Marianna, ruz he diouchod, a gemeras al loen hag ez eas betek ar gloued :

— Dal't, aze emañ ! emezi da Haid, en eur stlepel anezañ war an hent.

**

Ma oa yenijenn etrezo araog, adaleg neuze e teujont da veza enebourezed gwirion.

Betek fin an hañv e padas an abadenn. Eun devez a viz Eost, mintin mad, Gaid a zeuas war dreuzou he dor da roi eun taol-skub. Gwisket oa ganti he dilhad sul. Marianna a welas anezi dre he frenestr. Ne oa interamant ebed, na selvichou deiz-ha-bloaz evid den tro-war-dro. Marteze bennag e kemerfe bremaig ar harr evid mond da Bont 'n Abad, pe da Gemper ? Dond a reas da durluta dirag he dor gand eur skubelenn, pa glevas trouz ar harr. Gaid, fichet, a oa o tond er-mêz euz he zi. Gand he dorn e ree sin d'ar blenier d'he hemer. Hemañ, dievez da genta, a roas pa he gwelas, eun taol mah war ar starderez, ken na viaouas war dir ar rodou.

E-pad an amzer-ze, ar haz, deut er-mêz war zeulou Gaid, a oa eet d'azeza evel boaz e-kreiz an hent. Marianna, en tu all, a spontas. Kemer a reas eur pennad tiz en eur helver : « Bichig ! Bichig ! » gand eur vouez ankeniet. Gaid a droas neuze he fenn. Pevar pe bemp paz he-doa d'ober evid tenna ar haz euz a zindan rodou ar harr. Heb gouzoud e kerzas : ne oa eviti mui na karr, na Pont 'n Abad. Ne wele nemed he hzig o vond da veza brevet. Dres d'ar memez amzer e tigoueze an diou vaouez e-kreiz an hent, hag ar harr a oa warno... hag a falhas anezo, damstouet evel ma oant.

Ar blenier, en eur zerri e zaoulagad, hag en eur vlej al evel eun den gouez, a vabe muia ma helle war ar starderezh. Ar rodou, skoilhet, a ruzas war an hent. Re ziwezad, siwaz ! Gand taol tourt an oto, an diou vaouez a oe stlepet tri pe bevar metr pelloh... pezh a ziwallas dezo o bubez.

Er harr ar veajourien, bern war vern, a zave, strafuilhet, o daoulagad leun a anken.

Ar merhed a oe dastumet, diskrohenet kaer; tal unan a ziwade, penndaoulin eben a oa faoutet hag he daouarn diblusket. Ar paour-kêz Gaid, astennet a hed he horv, he lostenn troñset war he fenn, a oa eun druez he gweloud. Marianna a oa bronduet ha bloñsed. An nesa a gasas peb hini d'he zi, da walhi dezo o gouliou, d'o fakodi gand serviedennou lardet a amann, evid diwall ouz ar hig da bega ouz al lien. Goude-ze ar harr o hasas da Bont 'n Abad d'an ospital. Ne felle ket dezo mond, nemed ar blenier a gomzas rust :

— Da Bont 'n Abad, ha dioustu ! Piou oar ma n'hoh ket bet gloazet en ho tiabarz ? Red e vo kemer eur radio. Me zo asuret...

An engroez a oa ali gantañ. Soazig, en eur ouela, a yeas gand he mamm.

— Ar haz eo an hini a zo kacz, a lavare ar wazed war an hent.

— Peleh emañ ! a houlennas unan bennag. Marteze eo bet brevet gand ar rodou.

Azetet war gab e reor, al lozn a oa aze, habask, dindan ar harr, o walhi e vourrou gand e bao.

— An torh ! a hourdrouzas unan, en eur stlepel outañ eur fozad grouan.

Eul lamm a reas, ha gand eur zell a gounnar en em ziskoachas euz a zindan ar harr. Neuze, d'ar piltrot, heb trei e benn, e lost savet a bik war e gein, en eur ziskouez d'an dud bleo du e benn a-dreñv, heuguz ken na oa mez, ez eas kuit.

N'eo ket bet gwelet abaoue.

— An diaoul oa hennez, sur ! a lavare Gaid da Varianna, er gwele e-kichen, goude bizit ar medisin ha labour ar seurezed war o zro, rag er memez kambr oant bet lakaet o-diou en ospital.

Pa zigouezas Soazig, goude beza bet o kas kelou da Ber-Din, e oant deut a-nevez mignonezed vras.

Bremañ, deut en-dro d'ar ger, e tremen an diou vigoudenn o amzer oh ober stamm, evid farda loereier d'o bugale vihan, rag dimezet eo Soazig ha Per-Din.

Hervez am-eus klevet, Gaid ha Marianna o-deus bremañ beh a gi.

Reun MENEZ KELDREG.

Bremañ e teu ar pôtr d'ar gêr...

... « Bremañ e teu ar pôtr d'ar gêr !
O Mari-Joz ! ô Mari-Ren !
Poent ober koan ha bale gren...
Ar pôtr, c'hwit oar, zo eet e kêr !

Ha skrivet mad en-doa diziou
O Mari-Ren ! ô Mari-Joz !
E vije deut d'ar zul d'an noz,
Setu ma teu d'an devez hiou.

Hag ober tan eun tammig cher,
Eur zoubenn dous, ha c'hoaz-zoken !
Ken tal a wech e vez er gêr...
Kemend a draou en-deus da ren !

A-ze, m'ho-peus eun dousenn viou
Da bresta din abarz serr-noz?...
Chê, dont a ray 'benn eur pe ziou
Ha me jom c'hoaz da gonta kôz ! »

Eur skub d'an ti ha chou d'ar yer. —
(Emañ d'ar poent o vond d'an tren !)
Ar vaouez goz ra ken ha ken,
A lak an doal, a lak ar gwer :
Emañ ar pôtr o tond d'ar gêr !...

Ha greom tan braz : m'en-defe riou !
Ha bravat tra : eur boked roz
A vleunie c'hoaz 'n eur hornig kloz. —
'N eur podig glaz, emañ vid piou
Ar rozenn ruz bet trohet hiou?...

Degouezoud ray a-benn-embert...
(D'ar poent emañ e Kemmen-ven !)
'Vid ober hent 'do amzer yen !...
Dija an noz ? Na devez berr !

Bremañg vo trouz e voutou-lêr.

Ha skedi ray e zremmig bliou
E toull an ti a-greiz an noz,
Ha c'hoarzin ray 'n e genta pôz,
Ken tuz e chod gand krog ar riou!

Eur paz er porz? ez a e-biou...

Ha paziou all. — « Na 'z eus deut den? »
An tad 'n hin 'eo, e zavar groz.
— « Skrivet en-doa: war-dro serr-noz! »
A lar ar vamm 'n he zavar plên.

Er-mêz ra noz hag avel yen.

An eur a zon a dôliou her:
— « War-rôg emâi diwar diziou! »
— « Da gonta kôz 'n eur vond e-biou
E chom, me-bâi, e porz kreiz-ker! »

Ar vaouez gêz 'z a fall he liou.

An tad en-dro a daol e boz:
— « Meus-aon, lar-heñ, ne zeuio ken! »
— « O yao 'michañs! » a lar eben,
Hag ouz he horv e stard he broz.

Ha gand he neh he mouez a gren.

An noz 'n o hreiz a zil e riou;
O zoñjou kuz a 'z a gand herr,
Spontet a-grenn gand aonenn dêr:
Da glask ar pôtr ez eont o diou —

Chê! Keid-all-zo n'eo bet er gêr!

*
**

Dirag an dôl, heb ober kôz,
A-bann o fenn er goulou berr
Emaint o-daou, o-daou 'n o zerr:
Anouedet int 'n o halon gloz.

Karantez wir zo eet da fôz:
Emañ ar pôtr gand koan e kêr
Oh ober cher, oh ober kôz
E goudor tomm ha goulou sklêr.

Deut eo ar goañv da heul an noz
Ha skarnil zo war-nij en êr
Ha tre d'an ti eo deut e flêr...
An deliou hañv a ruilh er foz,
Er gwez e freg an neizou koz.

*
**

Ne zeuio ket ar pôtrig ker,
Ne dalv ket ' boan hen gortoz ken,
Ne dalv ket ' boan al loaïou stên,
Ar plajou-liou, an doal, ar gwer...

Ha soñjal reont. Ne laront ger.
Ar zoubenn dous a riell, yen.
Chê, n'eo ket deut ar pôtrig ker:
Ne dalv ket ' boan ar rozenn ken!

Ar boked tuz a-drumm a ver
E flokad fouesk d'al leurenn-vên...
E chom ar bod, e chom an drên,
E greizenn hleb a za da gler.
N'o gwelo ket ar pôtrig ker...

Padrig HELLENN.

Barzonegou

Deus, va bugel...

Deus, va bugel, war va daoulin,
da hoari 'r marhig d'an daoulamm.
Redom 'ta, marhegez lirin,
skañv da ene ha skañv va samm.

Deus ganin da Vro ar Hevrin,
ma strink eur stereun da beb kamm.
Chom, va bugel, war va daoulin,
da hoari 'r marhig d'an daoulamm.

Da vouez a zo sklaer ha sklintin,
da zell a zo flamm eun estlamm.
Daoust d'ar marh skuiza tamm ha tamm,
me 'gar da glevet o c'hoarzin...
Chom, va bugel, war va daoulin.

Labousig kaez...

Labousig kaez, 'barz da gaoued,
da gaoued kaer hag alaouret,
c'hoant ah eus, marse, da dehed,

'vid pignad war brankou 'r wezenn,
'zo o krena gand an aezenn,
war vleunv dispar, war eun drezenn,

pe nijal kuit d'ar broiou pell,
du-hont, war-bouez da ziwaskell,
... pa zigorfe an dorikell.

« Er-mez ez eus aer ha frankiz,
« er-mez... o nag a dreo iskiz!
« Ha chom er gêr a zo rekis. »



Labousig kaez, perag tehed,
perag tehed diouz da gaoued,
da gaoued kaer hag alaouret?

Er-mez ez eus kizier garo,
ar glao, an naon hag ar maro;
'vefe ket pell 'vefe gwall dro.

Sell 'ta, kaezig: er-mez 'zo goañv.
Da gorfig moan a vefe skañv
d'an avel yen, ha pebez kañv,

pebez doan, dreist-oll, d'ar verhig
'voes roet dezi da ginnig...
Echu 'vefe gand da vuzig,

da fringol ha da fentigell,
da lammou war da vransigell,
ha trouzig flour da ziwaskell.

Chom ganim-ni, rag ni da gar,
'vel eur mignon ha 'vel eur har.
Maz afes kuit, pebez glahar!

Skañvig war-bouez da ziwaskell,
ne dehi ket d'ar broiou pell:
'zigorin ket an dorikell.



Evelhen gand an Eürusted.
'kav dezi boud en eur gaoued,
eur gaoued kaer hag alaouret.

« Er-mez ez eus aer ha frankiz,
« plijaduriou ha yaouankiz.
« Chom er gêr hag e vo rekis? »

Tudou kaez, anez boud diboell,
na list ket Eürusted mond pell:
'zigorit ket an dorikell.

Jean-Daniel RICHARD.

Brehoneg Bro-Wened

Lost-Ru

Peur-kêh rah-koed, boud e ouiles hag hum zemantes, mès ne vei ket maleuruz amañ. Boud e dapei : keneu-garh o piah e garei, bou-leu sapin, kistén ha méz.

Mès me lon ne responté ket. Selled e ré dohein ged é zeulagad ru hag e laré dein é boèn. En ur loj em-boé eañ lakeit ha n'hellé ket partei. Dein é oé !

Chetu penaoz em-boé eañ tapet. En dé arall, a pe oèn é trohein lann, me gleuas ur grabisereh ardran dein, e zé ag ur wéenn. Me zistrout, mes nitra erbed ne welan. Ha mé de labourad endro, mès er grabisereh n'achiué ket hag e griué. Ha mé de zis-troecin éndro : me wélas ur braù a rah-koéd é sellé dohein doh blein ur wéenn. Deulagad rouz, ur gourhen rouz, ur lost dous ha stank e oé dehoñ. Hoant e zas dein é zepél. Ged ur mén bras é skoan ar gorv er wéenn. Er rah-koed e grené ha n'hellé ket chom ar er brank ged en taoleu stank. Eañ goéhas d'er yas heb gellein stagein doh brank erbed hag é tapezan enoñ én ur saillal huan arnehoñ. M'é stagas doh ur wéenn ged ur fisélenn de hortoz ma sonnehé kreisté aveid doned d'er gér de zèbrein.

E pas étal velin Korlei er Roh, é huchen arnehoñ : — « E Korlei ! Tapet em-eus ur rah-koed, des d'é wéled, braù é ! » Korlei e arriuas kenteh ar dergei en nor.

— Sell dohtoñ, émé-mé, braù é, ne gaves ket. Sell doh é lost foañet, é zeulagad spiz, é gourhen rouz !

— Mès biù é ! émé-eañ, é kulein el spontet.

— Sureroalh, ne hellan ket lahein ur rak-koed a-mod-sé alkent, mès te zeï de hoari getoñ pe vo én é loj. Betag goudé, Korlei, mal e vo moned de zebreïn, rag sonet é kreisté.

Arriüet ér gér, m'é lakas én ur loj. En dé arlerh, me yas de

wéled me rah-koed em-boé añuet Lost-Ru. Eañ fourbouché é klah un toull de voned ér-méz : — « Marsé, e zelié choñjal me labous, un dé pennak é hellein achap ha kavouid éndro mem brodér. Me havell huch arnein, ma ret dein gwéled éndro en neañ ged er stired d'en noz é-mesk er brankeu sapin, derù, haleg. Me zeli gwéled en hialu é pas étré er brankeu aveid hun tuemmein, hag er radenn ihuél, en toulleu luherned, er lann, er bodeu keneu-garh, rah er léhieu émen é hoarien. »

Buan alkent, é oem deit de voud kansorted. Un dé é oen é rein bouid dehoñ : un tammig bara ha deur eùé. Koutant e oé. Me drezas men dorn én é loj d'é gemer entré me zivreh. Nezé m'é zorlotas, trankil e oé. Eañ sellé dohein ged é zeulagad rond, soursiabl ha biù. Karantéuz e oé ! E lost disolit flouriké men divreh, ha me vouré nezé. Na souéhuz ha dous é oé ! Sel mui é sellen dohtoñ, sel mui é karen anehoñ. Nezé é arriuas mem breur Yann é ridek, hag eañ ha lared dein é tihostal :

— O Job ! Reit eañ dein ! Plijet e rehé dein kement é zevoud étré men divreh !

M'é lakas ar é vreh én ur lared : — « Ché eañ, mès groeit atañsion dohtoñ. Mar achap genoh, é tapeët ur rèvrad ! »

Er rah-koed e sellé dohein ha doh er fenestr. E lagad trist e ziskoé dein penaoz n'hum gavé ket éz é diùvreh mem breur. Me ouié, en devé anséet moned kuit, mès mem boé plijadur é sellé dohtoñ.

Un distrou, hag é oé me rah-koed étal er fenestr hag ér méz !

— Nag ur penn sot a vreur em ees ! Pelot ! Chetu me rah-koed kollet dein ! Sotoh oès el un azén ! Kerhet de lared de mamm petra hou e groeit.

Eañ gomañas ouilein, ha mé moned arleh Lost-Ru. M'é welas étal troed ur wéenn, mès penaoz é zepél ? Eañ hellou krepél ér wéenn ha ne hellan ket. A pe dosten de Los-Ru, é krapas eañ ér wéenn, hag é saillas a wéenn de wéenn. Fonnaploh eidein é kerhé ha dianal e oèn é rideg ar é lerh. Un tammig pelloh dirag-dein é wélen melin Korlei. Korlei e oé ar terzeu en nor. A bell m'é gleuas : — « Salud doh, Job ! Petra arriü genoh ? »

— Kollet em eus me rah-koed ! Mem breur en des eañ losket de bartei. Eañ des tapet skoarnadeu, mès ataù ne vein ket avañsetoh. Betag goudé, ret é dein moned fonnabl ar é lerh.

— Añsé é zepél. Job ! E tuned éndro te zeï de lared doétrieu dein. Boyaj ha kouraj vad doh !

Ur hi e harhé doh troed ur wéenn just a pe oèn oeit a di Korlei : — « Perchañj éma me labous azé ; er hi en des eañ héliet », e chonjen. Ha hoah, penaoz é zepél ?

Mès en noz e dosté. En hialu e oé ru-tan ar zisparti en neañ

1. Keneu-garh, kraoun-kelvez.

ag en doar. Ne oé ket mui kalz a auél. Me choñjas ér péh em-behé groeit: loskél er rah-koed pé derhél ar é lerh. Chuih e oen hag em-boé un tammig hoant, ha sehed: — « Klaskam boud atañ! é chonjen.

En ur moned dret diragdein, me wélas avalenneu, drein étaldein hag arnehé mouiar. Kistén braz e saùé diragdein ken plom ha bodenneg. Me yas dehé ha me gemeras avaleu, mouiar, ha me gargas me saheu lavreg a gistén. Avazé, me wélas splann gwé koed-gwern (2), koed-krén (3) ha haleg ar vord ur hoah. Aweid torrein me séhed é tichennen én ur rideg dehi.

Arriuet éno é souben me fenn én deur, hag én un tenn, me ivas ur bochad. Ardrou me 'fenn, boud e oé hwisped é krolleïn, boud e oé eué penneu-foll (4) deur: unan glaz-teur hag unan gwerh, e gaien braù oll, rag ind e neijé ged doustér, hag ou diüachell e luéhé d'en hiaul ha nezé ind durhé ligernuz. M'anséé ou zepél, mès nitra d'obér, ind e yé é kreiz er hoah, ha ne vennen ket moned é kreiz dehi arlerh devoud hwizet, d'en eun a cherrein un aneouid. Ne chonjen ket mui a zivoud me rah-koed. Tampir eitoñ. Hoant em-boe kousked. Eraok partei, me daolas ur sell doh er hoah. Just étaldein, boud e oé radenn, mañ ha geot. En-omesk léah-gézéd (5) greské hag e vougé er géot é tisplayal o dél arnehé. Etaldé kegid (6) glaz e vogedé, é seùél èl parapléieu gwenn én èbr. Doh troed ur wéenn haleg é kreské drein hag azohtë ur bod kelenn e saùé. Deliaù-rid (7) e ré tro troj unan arall hag e huské er wéenn a ur sé braù, glaz, tré ma seblanté linard (8) doh é zroed bout er boteu anehi. D'en tu rall ag er hoah en torgen e saùé éndro. Gwé derü, ar vord en deur e vreiné, hag éné, pimpo (9) greské. Chumenn chomé ar en deur arleh arnañ er suhun paset. Lan e oé er hoah a zeur, rag boulliardeu foll glaù e oé koéhet ar en douar. Ur wéenn oulmenn-du (10) en doé hé zroed én deur hag eneb dehi é kreské kiouid (11).

Arlerh devoud sellet spiz doh rah en treu-sé, mé ha krapein éndro. E oén é arriü marsémei a diü pé tèr hard leù ag er gèr étal er Gochelin (11 a). E oèn ar ur mané étal taoleu-mein kam-

2. Koed-gwern, gwernenn.
3. Koed-krén, koad-elo.
4. Penn-foll, nadoz-aer.
5. Leahegez, c'houervizon.
6. Kegid, id.
7. Deliaù-rid, ilio.
8. Linard, linad.
9. Pimpo, haval doh un tok touseg, liu glaz.
10. Oulmen-du, evleh.
11. Kiouid, louzeuenn fall e dro én-dro de droed er gwé, en é droed é kav er vugale ur boedenn e za geté aweid betumein.

11 a. En anu-leh Gochelin, e ziskou dem nen dé ket oeit atou Z de H é brou
En anu-leh Gochelin, e ziskou dem nen dé ket oeit atou Z de H é brou
Gwened: Gochelin e zo aweid Goh-velin.

pennet el ur gromleh. Seih mén braz e oé fourchet ar ur fojell, donk ha degour. Etaldé, gwé kistén nuah-pill, rag en auél en-doé kaset éraog en deliaù, seblanté boud soudarded é oarn en taoleu mein.

Na chuih e oèn! nem boé ket hoant moned d'er gér, ha hoant em-boé kousked azé. Me charras deliaù er gwé kistén e oé azé. M'ou boutas ér fojell, édan ur mén. M'ou displegas: hantér er bern édandain aweid kousked. Me lokas en achimant aweid lakad arnein pe vehen bet oeit de gousked. Ha me grasas éndro ar unan ag en taoleu-mein.

En amzér gomañsé kloarad. Er sapin ardrou deïn e oé luchen-net dré un auéennig kloar hag en noz é koéh. Etré brankeu er gwé é wélen hiaul ru, ha guhavé ur gogusenn bennak e basé diragdon. En niañ e oé réih, rah e oé didrouz. Me gleué boeh er chignaned (12), pé er grillan é hwitellad. Rah en éned e oé kludet ar brankeu er gwé, mès en éned noz hum apresté de voned de vrézelad en ampréoned. Ag ur bod benal un hwider (13) e saùé dret d'en niañ, pé un estig-noz e gané ged é voéh melodiuz: ur gohann (14) e bartias de getañ, ur gorrér achapas é hudal, hag er logod (15) penn-dall e foctas en èbr hag en amzér aweid brezélad. Goailled e zo bet spontet ged en trouz safaruz-sé, ur spég (16) eué hag e gleuen é pokein doh troj ur wéenn e neijas pelloh.

Koéh e ras me sell doh troed ur wéenn, ha petra wélan? Lost-Ru, e oé é selled dohein; ged goapereh é seblanté lard deïn: — « Ti hell rideg ar me lerh, ne me zapei ket, stank e oès! »

Me saùas aweid moned ar é lerh, mès doh men gwéled, eañ saillas a varenn de varenn, ag ur wéenn d'un all, ha chetu me rah-koed kollet deïn. Neuzé me zas de choukein ar en taoleu-mein. Er lann e seblanté kousked. En un taol, ur luhern e saillas ag é doull én ur chalpal hag e ridas d'er hoah aweid ived. Un dro spered bamuz e oé ém 'fenn, rag n'em boé ket bet eun anehoñ tamm erbed. Nezé me yas de gousked: ag un tu ur ganenn hum streué é peb léh, hani er grillan, hag, a daoleu, ur chevech e hirvoudé. A du rall er hoah, ne wélen ket, goust hwék er boud (17) gavr, hag er lugustr (18) milén, goust nerhuz bré er sapin, arriué deïn a drest er garh.

Er loér oé saùet, n'hé gwélen ket rag oen astennet édan en

12. Chignan, gweskler, rannig.
13. Hwider, alhwéder.
14. Kohan, kaouenn; korvér, én haval doh ur gohan. Chevech pé ferjé, fresell (er gérieu sé e za ag el latin présagium: é harm e zo sanset ur merch fall).
15. Logod penn-dall, askell-grohenn.
16. Spég, kazeg-koad, poker-koad.
17. Boud-gavr, gwivoudenn, iliaurez.
18. Lugustr, elestr.

taoleu-mein, er hein turheit de sañ-hiaul, mès dirag-dein hé luhed e splanné hag e sorsé peb korn er hoed. D'er goubañuél, a pe goéh er goleu dé, é treboul lein er gvé, mès abenn kaer a pe sañ goleu er loér el ur galon tinéroh, éh izella ou hlemm hag é tidrouz en noz. N'em boé ket hoant hum zistag ag er gelloud tiouél-sé, ag er léh yaouank ha fresk splanderet d'ur goleu didrouz.

Me gleuas ur garm, unan ag e zé a ziardran dein, ihuél ha spiz. Me hoursaùas ha petra wélezan étre er brankeu skléréit d'er loér ? Piemp pé hweh rah-koed ! M'anañaz étrezé me labous Lost-Ru. E oé doh penn er rummad. Me grias arnehoñ : « Lost-Ru, deit kansort ken mad ha dous ! » Laret e vehé bet en deoé eañ komprénet; eañ voutas ur garm spiz e ré hirisein er gourhen. Ind e zas én ur rideg. Lost-Ru e saillas ar me skoé tré ma krollé er ré-rall én dro dein. Mès én un taol é oé kleuet trouz el luhern é toned éndro, hag er chalperèh blaoahuz e spontas er rahed-koed. Ind e bartias én ur rideg. M'ou helias; me gerhé édan er vrenchir izél ha m'arriúas étal ur garh. Me lakas me 'fenn étre diù wéenn vihan ha me wélas ur léh hamb gwéenn erbed. Er loér, izél hoah, ne luéhé ken meid un tammig. Me wélas azé er rahed-koed, e saillé, e grollé ged er blijadur. Me saillas eué, mès nen dé ket én-o-mesk é koéhen, én ur fojell donk lan a fank e oer kentoh.

Ged en taol me zihouskas. Ne oé ket ér fojell é oén astennet, mès ar ur holhedad deliaù édan taoleu-mein. Me gromprenas nezé em boé groeit un huniad. Er loér e oé arriù de lein en niañ hag ardro kreiz noz é telié boud.

Mé ha seuél buan, ha d'er gér de gonfortein me zud, e oé bet gwall néhanset ar men divoud.

Més, ankinet e oé me halon a voud kollet de viruiken me hansort, me Lost-Ru ken karet.

J. RIO, Mendon (Morbihan)
(Lisé en Orient).

Puns koh Kerderv

I

Didan en héol, puns en dachen,
Débret d'en aùel ha d'er glao,
e duemm é vein deit de vout
met brao atao. [gwen,

V

Kleuet en des komz brehoneg,
Kanein sonnenneu koh er Vro.
Ne iët ket kalz ar er galleg
é ker tro dro.

II

Ur souéh é gwéled er Breihad
é klaskein bepred er gened,
nag é faot dehon kizellat
groanvén kalet.

VI

Hiniù 'ma en dud é mod-kér,
disprizet é er brehoneg,
ur gorzen e zegas d'er gér
deur fresk ha huek.

III

Più e hellehè gout bréman
é pé blé é ma bet saùet,
g'er chifreu kuhet ged er man,
hantér krignet ?

VII

Er puns e chom é unan pen
é touéh treu koh dizalbadet.
Ne servij meit d'un dra hepkén,
deurat lonned.

IV

Gwélet en des er festailleu,
En dud é tansal laridé
doh er bombard hag er binieu
leün ha gé.

VIII

Marsé é tei én dezoned
un dé ma vo diskaret buan,
pe vo dilézet er ronsed
eid ur har -tan.

Hénoal 1958.

A. ALLAIN.

Brezoneg beo ar bobl

Kontadennoù diwar-benn Maner Navureg

Maner Navureg — pe Lezureg — a zo bet savet er bloavezh 1504 war lez an hent a gas euz Goaien da Veg ar Raz, tost da Zant Tujan.

Aotrouniez vraz, sur awalh ar re halloudusa euz ar Hab, a oa o chom aze araog an Dispah Braz (1789), « Roueed ar Hab » a lavare an dud. Ne oant ket gwall garet gant ar Haperien hag eur bern konchennou farsus a zo bet savet gant on tadou koz, evid ober goap outo a-dreñv o hein. Meur a istor diwar-benn Maner Navureg a zo bet das-tumet gant an ao. ao. Le Guennec ha D. Bernard.

Ar re am-eus gellet klevoud ma-unan a dalvezo marteze da beurlenvia an dastumadenn. Lod, koulskoude, a zo re zizeread evid beza embannet.

R. G.

Troiou Perig-choz koz

Perig-choz Koz a oa eur haivez hag a veze goulennet aliez da labourad gant Itron Maner Navureg, rag fiziñs he-doa ennañ. Eur gwall vicherour a oa hag an Itron ne wele par dezañ.

An Aotrou ne jome morse er gêr hag e wreg a ranke en em zoursial euz a beb tra en ti. Pa erruas Perig gant e baotr-micher, an Itron a lavaras dezañ : « Hirio e vo red deoh ober rojou da zaou garr, ha goude c'hwi a zreso anezo, rag eet int fall awalh. 'N em lakeit ho-taou d'al labour. »

D'an eur a greizteiz e oe sonet ar hloh da helver an dud d'o merenn. Daoust da vistri ar maner da veza pinvidig, ar boued ne veze na founnuz na mad. Ar mevel braz hag ar plah en em glemme : « Setu aze 'vad boued da roi da dud a zo en em laha tog an deiz * er parkeier ! Penaoz e soñj deoh e hellfem mond waraog ! »

Perig-choz Koz ne lavare ger ebed, med pa zeuas ar mevel braz er-mêz euz an ti e halvas anezañ : « Me, Perig, emezañ, me oor penaoz e hellfeh dond

* e-doug an deiz.

a-benn da gaoud da zebri kemend ha ma karfeh. Arabad lavared netra : an dra-ze a rank chom etrezom on-daou !... Er hraou braz ez eus eur mell kole lard. Sikour ahanon ha me a teuo a-benn outañ. Deus goude pa vezo eet an oll da gousked. »

En noz, ar mevel braz ha Perig a yeas o-daou d'ar hraou. Perig-choz Koz a dennas eur reunenn hir ha kaled euz lost ar hole : « Stag e benn tost d'an nask, emezañ d'ar mevel, ha tenn e deod, hir er-mêz. » Skoulma a reas neuze ar reunenn war deod ar hole, ar starta ma helle, ha kuit o-daou da gousked.

Antronoz-vintin, pa yeas ar vevelien d'ar hraou, e weljont ar hole ar glaour o tivera euz e hinou. Blejadennou truezuz a laoske. Ar plah a gasas kelou d'an Itron : « Deuit buan, Itron ! N'ouzon ket petra zo c'hoarvezet gant ar hole : klañv eo sur awalh, rag ne ra nemed glaouri ha leñva ! » — « Mond a ran dioustu, eme an Itron. Klaskit ivez Perig da zond da weled anezañ. »

Er hraou e welent ar hole paour en eur stad truezuz.

— Petra zo c'hoarvezet gantañ ? a houlenas an Itron.

— Ma Doue, Itron, eme Berig, di'z e kavan lavared deoh ! Ar hole-ze a zo bet taget gant ar gounnar vud.

— O, Perig paour ! Neuze eo kollet ! Eul loan ken lard ! N'eus tra d'ober nemed e laza, ha toulla eur foz evid e zouara.

Perig a dosteas, ha, war-bouez, e lavaras d'an Itron : « Na lakeit ket ar hole-ze en douar, Itron. Kounnar bervet ne ra droug da zen. »

— A zoñj deoh, Perig ?

— Pa lavaran deoh, Itron !

— Feiz, n'ouzon ket ! N'am-eus c'hoant ebed da dañva ar hig-se.

— Na dorrit ket ho penn evid ken nebeud, Itron ! Gwadam al loan, kempennom anezañ, lakeom an tammou er jarnel da zalla, prest d'ober soubenn d'ar vevelien ; ar-re-ze n'int ket tud figuz, ha ne ouezint ket e vo ar hig-se hini eur hole kounnaret.

Greet e oe evel ma lavare, trohet ar hole a dammou ha lakeet brao er jarnel. An devez-se e oe taolet eur mell tamm kig er pod soubenn. An Itron a oa euz da veza arboellet an aneval, e-leh e lakaad en douar. An dud ivez a oa laouen, me lavar deoh, hag eur mañjer mad a rejont.

Eet an oll da gousked, Perig-choz Koz a lavaras d'e baotr :

— Bremañ, pa zo boued mad da zebri, e rankom mond kuit, peogwir eo echu al labour !... Selaou 'ta ! Warhoaz vintin me a yelo da gaoud an Itron, ha kaoud a rin eur feson bennag evid deom chom hoaz.

Antronoz vintin, Perig a oa dirag an Itron :

— Itron baour, emezañ, eun taol brao am-eus greet !...

— Petra 'ta, Perig ?

— N'ouzon ket peleh e oa ma fenn ganin... Greet am-eus ar rojou oll euz ar memez tu...

— N'eus nemed an dra-ze ! Na rit ket bilou ! Koad awalh a zo aze. Grit peder rod all.

Ha Perig, leun e galon a levenez, a deuas da lavared d'e gamalad e-nijent hoaz e Maner Navureg meur a zvez labour, boued forz pegemend ha paemant, evel just.

Perig-choz koz hag ar youd

Perig ha Jakez, e gamalad labour, a oa o peurober ar beder rod d'ar harr, hervez m'he-doa gourhemennet an ltron, pa weljont karr ar meilher o fond el leur : — « Sell ! eme Jakez, bleud fresk ! Youd gwiniz a vo hirio da goan, rag an ltron a gar eston ar youd-se. »

— Gwell a ze, Jakez ! Ni on-daou, ivez a zo sod eston gand ar youd gwiniz.

Pa oant deut d'o hoan, e oa eur pezh mell pilligad youd war an daol, gand beb a skudellad laez da beb hini. Ha beh d'ar youd ! Goude beza debret kemend ha ma hellent, ez ejont d'o gwele. Dre greiz an noz e oent dihonet o-daou. — « Ma, Perig, eme Jakez, goude ma horvad youd, mond a rafe ganin hoaz kemend-all !... »

— Ganin-me ivez, eme Berig. Me oar, ma faotr, e peleh e vefe kavet eur pladad mad. Gwelet am-eus ar plah o karga ar rest euz ar youd en eur plad, hag o kuzad anezañ en armel. Kerz, Jakez, d'e gerhad !...

— Ya, feiz ! Med penaoz e kavin an hent da zond en-dro heb tamm gou-lou ebed ?

— Gortoz eun tammig !... Me a zreso an dra-ze. Ro din da vreh ha me a stago eur fisilenn outi. Evelse, en eur denna warni, te a gavo da hent.

Ha Jakez d'an traon, d'an armel. Kaoud a reas ar pladad youd, ha heñ en-dro. Erruet er gambr, e kleve, e soñje dezañ, e gamalad o rohellad.

— Dal ! Aze ema ar youd ! Debr 'ta !

Hogen egile ne ree nemed rohellad.

— Ma zoñj dit e chomin tog an noz da astenn youd dit ! Setu, aze ema ! Hag e stlapas ar youd dre fas ar housker...

War an taol al loar en em ziskouezas, ha petra a welas Jakez ? Gwele ar Vistri a zo dirazañ, an Aotrou hag an ltron Navureg kousket ebarz.

Buhan-buhan en em daolas er-mêz da glask e gambr e-unan. Perig-Choz a oa ouz e hortoz :

— Pell out bet gand da dro, emezañ. Peleh ema ar youd ? Ha debret ' teus anezañ, heb digas tamm d'in ? Setu aze 'vad !...

Jakez a gontas ar pezh a oa c'hoarvezet gantañ. C'hoarzin a rejont o-daou ha koulskoude o houstiañs ne oa ket e peoh, gand aon e-nije gouezet an Aotrou.

Antronoz vintin, pa zihunas an Aotrou hag an ltron, Santez Perhed ! Na pebez reuz ! Beh e oe bet, me lavar deoh, etre ar vistri abalamour da youd Jakez !

Sorhennadenn Perig choz koz

Perig-Choz ha Jakez ne hastent ket da echui al labour, rag bremañ e oa boued mad gand kig ar hole, ha lojamant ouspenn.

Perig e vije atao e benn, koulz hag e gorr, o labourad, hag e soñjas :

— Ha m' am-mije gellet ober eur skeul hir-hir, da vond betek an oabl, evid gweled penaoz ema ar baradoz duhont el laez ?

Jakez ha heñ en em lakeas d'al labour. Ar skeul greet ganto a oa ken hir ma o-doa poan vraz o sevel anezi. Dond a rejont a-benn koulskoude, da lakaad anezi 'n he zav ouz talbenn Maner Navureg : — « Ma Doue, a lavare Jakez, Perig paour, ped skeul evel honnez a rankom ober evid erruoud betek an neñv ? » — « Groom atao, eme Berig, ni a lakaio anezo penn ouz penn. »

Erfin e oe staget an hini ziweza. — « Mad, eme Berig, pak din bremañ an talar, ha stag anezañ din mad war ma hein, rag exomm am-mo euz va daou zorn evid krapad ken uhel. Peg mad er skeul, Jakez, ha diwall mad ne ziskrapo. »

— Aon ebed da gaoud, eme Jakez, ma talhez mad, me a raio ivez.

Perig-Choz, barrenn goude barrenn, a bignas, a bignas, a bignas atao. Va Doue, nag uhel eo !

— Ho ! Perig, a jous Jakez, mad ema ganit ?

— Ya, nemed tenn eo. Mond a ran skuiz.

Perig ne zante mui e zivisker, krena a ree, en eur uhelaad atao, koulskoude. Ne glev mui chouadennoù Jakez, hag e ouie awalh e oa tost da zigouezoud. Beb ar mare e chome da ziskuiza, evid gelloud kaoud e alan, rag an dour-hwez a zivere outañ bilh-bilh. Pa zave e benn, e wele e oa tost, hag a gemere kalon adarre.

Erfin e erruas an den. Dao oa dezañ bremañ kemer an talar diwar e gein, fiad mad e zivisker ha sevel e zivreh evid saka an talar e krogenn an neñv.

— La ! Ema 'barz, eme Berig. Bremañ n'eus nemed trei d'ober evid digeri eun toull braz awalh din da baseal, ma vo gwelet petra 'n diaoul a zo er baradoz.

Ha Perig da doulla, da doulla gand an talar. Kemend a bres a zo warnañ ma ne daol mui evez ; ar skeul a vrasigell ken na glever eur mell strakadenn. Torret ar skeul ! Perig-Choz Koz a zo chomet istribilh ouz an talar saket e bolz an neñv, eur spont braz peget ennañ : — « Ma Doue ! Ma Doue ! Deuit d'am zikour ! » N'eus mui nerz awalh en e zivreh, hag e kouez, e kouez d'an traon !...

Dihonet e oe gand ar spont. Edo en e wele, kemend a veh warnañ ma oa deuet dezañ an diruj...

Dastumet e Pontekroaz gand R. GARGADENNEC.

Ar verh nevez dreset

Gwechall e oa mizer e Tronoen hag e Palud an Dorchenn. An dud a glaske gounid o boued mod pe vod. Pa teue bagou brevet gand an tourmant war an aot, ne vije truez nag ouz ar vartoloded nag ouz o madou. Peb hini a gemere ar mui ma helle.

Matilin a oa nevez dimeet da Gatell an Aot. Da abardaez e frikou, deut ar mare da vond da gousked, ar wreg yaouank a lavare d'he gwaz: — « Tourmant braz zo bet hirio. Pastur a zo! » Hag hi lakaad he meleuzenn hloan en-dro dezi, ha kuit deuz an ti plouz. Ne oe ket gwelet e-pad an noz. Antronoz, memez tra: — « Pastur zo! » emezi, ha kuit adarre.

An den yaouank a gawe start hag a lavare d'e vamm peseurt buhez e-noa gand Katell. Soñjal a ree dezañ he-doa eur mignon bennag:

— N'eo ket brao beza jalouz, eme ar vamm. Ma ' teus c'hoant goùd e peleh e pase da wreg an noz, ne teus ken mond war he lerh pa teuo an abardaez.

— Hag e yin, eme ar mab.

Deut an noz, ar vaouez yaouank a laka adarre he meleuzenn, ha kuit en eur lavared: — « Pastur a zo! » Glao-pilh a ree. Ar wech-mañ an oah yaouank oa war evez, ha heñ war he lerh.

Katell a ye d'an aot. Petra a glaske war an traez? Mond ha dond a ree euz an eil penn d'egile, euz an Dorchenn beteg Tronoen. He gwaz a rede dirazi, heb beza gwelet, hag a hourvezas e-kichenn ar mor evel eun den beuzet.

Katell a ziredas pa welas ar horv, en deñvalijenn. Pa he-doa touchet outañ, e lavaras:

— Tommig, tommig, nevez varo,
Doue e bardono!

Hag e tennas gantañ e chupenn. Mad, pa oa o sacha war e vragou, ar gwaz a zavas en e zav en eun taol, heb lavared grik. Leun a valiz, e tihastas gand e wreg eur gwiskad taoliou dorn ha taoliou treid, ken na ginnige koueza ar vaouez paour. Krava a reas d'ar gêr dreuz ar Palud en eur hopal: — « Eun den beuzet zo deut beo hag e-neus kannet ahanon! »

He gwaz a houlenas ganti petra oa c'hoarvezet:

— Eun den beuzet e-neus pradet ahanon, emezi en eur leñva.

— Petra ' peus greet dezañ?

— Netra!

— Netra? ' Peus ket tennet e chupenn digantañ?

— Yao!

— Ne felle ket deoh tenna e vragou digantañ?

— Yao!

— Mad ' neus greet deoh neuze. En e blas me ' mije greet gwasoh hoaz.

— Ne yin ket mui d'an aot, a lavaras ar vaouez en eur bignad er gwele-kloz gand he gwaz.

Abaoe an devez-se Katell an Aot a jom da gousked en ti. Mad eo a-wechou dresa ar merhed.

Dastumet e Tronoen gand
M. DIVANAC'H.

LODENN ar re YAOUANK

O klask an onner

Pa oan bian me a oa eur paotr c'hoarieller. Katz e plije din farsal ha setu amañ unan deh* va fentigellou.

Deg vloaz pe war an dro em-oo d'ar poent-se. E-pad an hañv pa veze an ehanou skol em-meze ar vicher a baotr saout da ober. Beb mintin e kasen ar zaout d'ar zan er foennog vraz, pemp kant paz deh ar gêr. Pa veze deuet poent merenn em-meze anezo da gerhed d'ho hraou evid ma hellfe ar merhed goro anezo araog an noz. Ne ranken ket chom ganto e-pad an deiz a-bez, rag ar foennog a oa braz hag uhel ar hleuchou en-dro dezi. An anevaled a oa eta boazed da jom eno o-unan. Kas ha kerhed al loened a gaven eur vicher inouiz a-walh.

Sanset e oa ivez ar hi da ziwall ar zaout er foennog, med ar hi-ze a oa drolig a-walh. Gwelloc'h oa gantañ mond da haloupad evid chom gand ar zaout. Pa veze ar poent da gerhed anezo d'ar gêr avad, e lakee koulskoude an taol d'ober e labour: kregi a ree en o charitellou gwasoh evid eur bleiz. En o diskouarniou e kroge ivez aliez, hag ar re-mañ a oa dantelezet a-bez. An dud oll deh Berven da Witevede a lavare oa eur hi kalz re waz d'ar zaout. Koulskoude me ne gaven ket, rag plijadur em-meze o weled va hweh bieh ruz o fringal dirazañ, hed ar hleuchou. Me a hoarze hag a ise anezañ hoaz dezo:

— Ata va hi! Ata dezo! Hennez zo eur hi mad! Ata dezo!...

Awechou ivez e kleven traou er gêr, abalamour ma reen an dra-ze. Lavaret e veze din:

— Na da ket da lesker ar hi da haloupad ar zaout, petramant e laki anezo da goll o liou.

Med me ne reen forz ebed hag a ise atao ar hi d'ar zaout.

Kaset oa bet eun onner yaouank er mêz evid ar wech kenta. Eur pezh plijadur! Pemp den a oa bet dister, rag an onner a oa railh en he hased. Ar hi, heñ, a oa gwall zelluz deh an onner baour-ze, hag he lost a wade p' oa en em gavet er prad kement e-noa kroget ennañ.

Deh ar pardavez evel kustum ez een da gerhed an anevaled d'ho hraou. Ar hi ne baoueze ket deh an onner. A-benn en em gaoud war an hent braz, e oa ivez eur waremm da dreuzi hag eno meur a vod lann ha strouez all hoaz. Ha setu amañ va onner a greiz-oll o vond a-dreg eur bod lann, e-kichen ar

* deuz.

hleuz araog ar hi. Eno e kouezas, rag fêz maro oa o haloupad. Ar gwad a ruilhe atao deh he lost ha deh he diskouarniou, dantelezet evid an hanter dervez nemed ken ' oa bet er-mêz. C'hwezi a ree ivez gleb-dour-teil, ha berr oa warni spontuz. Eun tamm truez am-oo outi, med n'oaan ket bet pell o faltazia eur fentigell. Pegwir n'oa ket gouest va onner da vond ken, e oa mad eno, ha me a lavarfe er gêr ne mije kavet nemed pemp bioh er prad e-leh c'hweh. Kredet e vijen dioustu, rag an onner e oa ar wech kenta dezi da vond er-mêz gand ar zaout all, hag an dud a zonzje e vije eet kuit deh ar prad he-unan.

Eun tamm poan am-oo bet o tigas ar hi diouti, rag « acharnet » oa warni. C'hoarzin a reen ennon va unan, en eur vond beteg ar gêr gand va femp bioh all. Soñjal a reen er blijadur em-mije bremaig o klask an onner gollet. Sirituz braz oan koulskoude, en eur vond da lavared da va mamm:

— Mamm, n'oa nemed ar bemp bioh goz ken er foennog!

— O! Va Doue! An onner a zo eet kuit neuze? emezi.

— Ya, emezon, kredabl braz!

— Mad! kea dillo d'ar park neuze da lavared d'ar wazed!

Lorh braz oa ennon en eur vond da gaoud ar wazed. Ar re-mañ a oa oh arad war lerh eost, ha kerkent ma klevent ar helou, e loskent eno an alar hag e teuent dioustu gand ar hezeg d'ar gêr.

— Bremañ iantao, a lavaras va zad, ne labourom ket ken ar park-mañ hirio!

— Setu amañ eur gempenn! a hrozmolos va eontr.

Pehi a reent o-daou, med ar mevel a gav din a oa eun tamm mad a lorh ennañ. N'oa ket eun den arrajet da labourad ha ne houlenne ket gwelloh evid echui abred e zervez. En eur zond d'ar gêr me am-oo c'hoari oh en em vired da hoarzin, rag an taol-mañ am-oo tapet anezo propig.

Dilloa ma c'hellent e lakeent ar hezeg en o speurinier. Pemp eur a zonas neuze e chapel Berven ha va zad a lavaras:

— Mevar ar foultr, iañ, e kavom anezi araog an noz! Truezuz eo alato koll eun onner ker brao all! Sur honnez he-dije greet eur vloh-goñkour! Saik! gwelloh eo dit mond ivez da lavared d'ar re an ti all dond da jikour klask anezi!

Mond a reen eta d'an ti all, med va mamm a oa dija en em gavet eno e va raog, hag ar mous a oa ivez eet da glask an dud d'ar parkeier. Me a deuas raktal d'ar gêr, ha pa glevas oa ivez erru an amezien da jikour klask an onner, va zad a lavaras deom:

— Mad, neuze gwella a zo da ober eo gortoz anezo. Bremañ e rankin prena eur hlotur elektrik; e-mod-se ne dei ket va anevaled da goll!

— Ya 'vad! a respontas va eontr, an dra-ze a zo eur menoz deh ar re wella! 'Benn eur hard-eur da-houde oam c'hweh el leur, prest da vond da glask an onner.

— Marteze, a lavaras va zad, eo gwelloh deom eva eur banne gwin araog loh!

— O! N'eo ket da! a respontas an amezog, pa vezo kavet an onner e vezom abred awalh da hleba eun tammig ar muzellou.

Va zad a roas neuze an urchou * evid klask an onner.

* urziou.

— Deom tri zen da furchal an douarou hag ar projeier, tro en dro d'ar foennog. An tri all a deio pelloh trezeg ar bourk, rag marteze eo eet penn-da-benn d'ar straed hlaz!

An amezog, va eontr ha me ez ee 'trezeg ar zan, rag me, ma n'oaan ket kreñv a-walh da labourad er parkeier, va zad en-doa lavaret din am-oo hoaz daoulagad nevez ha divesker skañv evid kaoud eun aneval kollet. Eur pezh lorh eta a oa ennon en eur loh deh ar gêr. Leñva, a gav din, e-mije greet ma vije bet lavaret din chom.

Mond a reem on tri dre ar straed ' biou m'oa deuet an anevaled bremaig ganen. An onner ne veze ket gwelet deh ar straed hag hini ebed ahanom ne soñjas mond da weled dreg ar bod lann e leh m'edo. War-eeun ez eem da zelled en eur poull-lin hag a oa e penn d'an neh deh ar foennog, kenkaz ma vije pilet an onner boour e-barz, ha beuzet; n'edo ket eno. Eun tammig koad a oa ivez e-kichen, setu ni da glask ennañ. Bale a reem er hoard a-hed hag a-dreuz, med onner ebed ne gavem. Me a ree va fosubl evid ma ne 'z afem ket d'ar waremm. C'hoant am-oo lakaad ar blijadur da badaud. An atant dosta d'ar foennog a oa daou hant paz deh eno.

— Deom da di Jakou, a lavaras va eontr, da houlenn ma n'o-deus klevet bioh ebed o vlejaj, rag honnez a zo o vlejaj bremañ, ken na foultr! Ar re-mañ n'o-doa klevet netra. N'o-doa ket memez soñjet ped bioh a oa er prad.

Eno koulskoude ne gollem ket all: Ar wazed o-doa tapet beb a vanne gwin, ha me am-oo bet ivez eun tamm kouign. Pa zoñas seiz eur e tour Berven ez eem 'trezeg ar gêr en eur zoñjal o-dije marteze ar re-all kavet an onner. Ker-kent ma oem en em gavet, eh erruas ivez da zad. Va mamm a skañvbenne, evel ma ne 'm-oo ket gwelet anezi hoaz oh ober.

Ha bremañ, ne gouier ket ken ivez petra oa deut ar hi da veza; daou loen kollet e-leh unan! Divizoud a oa greet erfin mond d'ar bourk, da lakaad an embanner da dambourinad evid ober klask d'an onner. Med a-greiz m'edo va zad oh en em bourchas da vond, e oa klevet ar hi oh harzal, hag ar mevel a lavaras:

— Op pa la! Henez eo ar hi iantao! Anaoud a ran re vad e vouez! marteze e-neus kavet an onner e-unan?

A greiz oll oa bet ivez eur vlejadenn druezuz; an dra-ze a roas eun tamm fiziñs deom adarre. An trouz a deue deh 'trezeg gwarem ar Zan.

— A! a lavaras va zad, gwelloh eo din ober en-dro ar waremm war ha lerh, en eur vond d'ar bourk, pegwir e teu an trouz deh eno, marteze n'ho-peus ket klasket mad!

Mond a reas dilloa ma hellas war e velo, eun tamm strakell goz, dre an hent braz. Ni a jome e-kichen an ti da varvailhad diwar-benn an onner: Petra a rafem ken, pegwir n'on-doa ket kavet anezi?...

Med va zad n'oa ket bet pell. Ha kemend a dro a oa ennañ en eur en em gaoud el leur, ma oa bet darbet dezañ paka lamm diwar e velo!...

— Deuit 'ta, dillo! emezañ, sternit ar harr evid kerhed an onner! Ahont emañ, hanter-varo, ha hemañ ar hoz-ki brein-mañ hoaz a oa oh harzal outi en e wella! Kouezet eo ahont dreg eur vodenn lann er waremm, hag e rankom digas anezi gand ar harr d'ar gêr!...

Va zad e noa digaset gantañ ar hi, a oa eet dillo d'e doull, moan e lost gantañ.

A-veh ma' noa echu va zad da gaozeal, ha ma' noa lakeet e velo er hreñch, oa ivez ar stern war ar gazeg koz, ha prest ar harr da loh. D'an daoulamm ez eem oll d'ar waremm er harr. Bremañ alato am-oo eun tamm aon, rag ma varve ar vloh e vije gwasoh kempenn. Pa welen an onner koulskoude e kaven n'oa ket e gwasoh stuchou evid p'oa erru d'ar gêr gand ar zaout all.

On c'hweh, en eur dermad eun tamm eh en em gavem da lakaad an onner baour er harr. Bremañ n'oa ket gouest d'en em vired da hoarzin ken; ar re all a hoarze ivez, pegwir oa kavet an onner. Hag an dra-ze a oa farsuz awalh: digas eun onner gand ar harr d'ar gêr, n'oa ket bet gwelet er vro-mañ hoaz, ha kredabl braz e vije marvailhet eur maread hoaz diwar om penn! Oll eh eem er harr da vond d'ar gêr. An dud a dremene en em houlenne ha ne oam ket eet da zod! Pa tiskargem an onner er gêr, e chome war he zreid hag eh eas d'he hraou he-unan.

Oll an abadenn a oa bet tamallet d'ar hi, hag e tapas eur roustad salud, rag p'edom o tiskarga an onner ne baouez ket da droidellad en dro dezi.

Me n'am-eus ket lavaret abaoe penaoz oa bet tremenet an trao; ma mije lavaret, e mije sur tapet eur roustad ker solud hag ar hi.

Erfin, pegwir oa kavet an onner hag e oa eet mad an trao eh eem oll d'an ti, hag ar wazed a evas beb a vanne hini-kreñv araog koan.

Saig MEAR deuz Berven.

Embannaduriou
EMGLEO-BREIZ

Nevez deut er-mêz,

Pez-C'hoari brudet

TANGUY MALEMANCHE

Gurvan ar Marheg Estrañjour

Eul leor a 128 pajenn. stummet kaer, dindan eur golo livet.

600 lur franco.

FONDATION CULTURELLE BRETONNE - B. P. 17 BREST

C. C. P. 380-96 RENNES

Notennoù ar Furcherien

Geriadur ha geriadur a zo

Geriou ar geriadur a zo stankoh eged na gred lod euz an dud. Nemed n'eus ket embannet geriadur *brezoneg-galleg* klok awalh abaoe hini TROUDE (1876), ha seurt leor a ra diouer da veur a hini.

Kenteliuz-kenañ eo geriaduriou Troude. Eur pennad-studi hir a vije d'ober diwar-benn an hini *galleg-brezoneg*, abalamour d'an notennoù a beb seurt strewet ennañ. Med, setu Yann pell diouz e gazeg, 'm-eus aon! Edon krog gand ar geriadur *brezoneg-galleg*.

Diwar-benn ar geriou roet gand BRUD (niv. 3) evel geriou na gaver ket er geriaduriou, e kavan e hini Troude diskleriaduriou a-zoare: TRIDEG: Leon: Tredeog = arbitre.

Troude: Tredeek, tredeok, s. m. Etredeok = en main tierce. (Ahano, sklér eo, ar ster nevez « arbitre »: « an trede den » o varn an daou genta.) FRESKI: gwalhi e zilhadr d'unan bennag.

Troude: a) Kemerit eur roched fresk (propre).

b) Freskein, V. changer de linge.

DIBELH: digempenn. Peilha eur bern plouz.

Troude: Pella, peliat = peler, ôter l'écorce, perdre ses poils ou ses plumes... *Peliet* = d'un homme sans énergie, on dit « eur yar beliet ». En français on dit « une poule mouillée » en ce sens.

CHOUPEY: choupa eur bugel, ober choupig.

Troude: choukik, ober choukik, terme enfantin, faire dodo. *Choukein* = se mettre sur son séant, voy. chouk, derrière du cou. (Choupa ha choukein a zo, d'am zoñj, an hevelezh ger.)

GANUZA, GANUZI: et aussi: beza ganuz, trainer sur les mots en parlant.

Ganuzi a ra: il traine sur les mots en parlant, comme beaucoup de pernes font en Basse-Bretagne. (E BRUD, ganuzi = gwalgas, ster disheñvel, nemed e Bro-Gerne, pa gomzer, e vez gwallgaset ar geriou; setu perag, moarvad « ganuzi » a zo disheñvel e Bro-Leon hag e Bro-Gerne).

Trawalh evid hirio. Kemend-se evid diskouez d'ar Vretoned a ra diouer braz eur geriadur *brezoneg-galleg*, oh ober gand peb tra bet embannet beteg bremañ. Pa glasker kentelia ar *brezoneg*, e tleer dibab, « peilha ar bern plouz », a dra-zur. Med, etre daouarn skrivagnerien ampart ha c'hoant dezo nijal uhel-uhel, n'eo ket « eur yar beilhet » a zo awalh. Ha setu perag e tle ar Vretoned yaouank labourad da zevel eur geriadur klok. Pa lavaran « ar Vretoned yaouank », ne gomzan ket euz ar re yaouank-flamm hebken. Nemed, e kav din, eur seurt labour, hir ha tenn, ne hallo ket beza kaset da benn gand eun den e-unan, dreist-oll ma emma erru war an oad dija: maro e vije araog beza echu e labour, kemend-all a zo d'ober. Eur vandenn tud yaouank, o ranna al labour etrezo, hag o houlenne allou digand ar re gosa, a hellje, moarvad, seveni seurt labour e berr amzer. Gwelloh hoaz, eur helenner Skol-Veur, o lakaad tud yaouank da labourad, gand sikour an oll levriou a zo etre e zaouarn.

J. TRICOIRE.

Blohaic'h ha Blohig

Ma c'hoarvez ganeoh lenn *Buhez Sent Breiz* savet gand Albert Le Grand, e galleg, e advoulladur an aotrounez Miorcec de Kerdanet ha Graveran (1837), ho-pezo tro da gaoud traou sebezuz e-keñver an istor. Kredig oa Kerdanet. Gwerziou brezoneg koz a lennoh ivez, ha notennoh all ken plijuz, rag Kerdanet a oa eun dastumer paperiou koz.

Setu amañ petra a gont e buhez Sant Albin: ar zant-mañ a oa bet o kaoud Childebert, roue Frañs. Sant Tugdual a oa gantañ. Ne oule hemañ nemed brezoneg, hag e ranke goulenn digand Albin beza e jubennour. Gwenedour e oa Albin.

Doare komz Gwenediz a zo deut, eme Kerdanet, da veza hini ar Hallaoued. Geriadur L'Armerye, p. 37, a lavar, emezañ: Er galleg a zou quasi toutt composet à irrieu à vrehonec Guénét, hag é faeçon caire dé gomz, hemp ton, a zou er même. « D'où vient cependant que nos Bretons Léonards ont si peu de respect pour la langue vannetaise, qu'ils l'appellent BLOHAICH, comme qui dirait, blocaille, mauvais jargon ? »

Hervez Kervarker, e geriadur brezoneg Ar Gonideg, BLOHIK a oa eul lezano roet da Wenediz. D'am zoñj, e-neus kemeret Kervarker ar ger digand Kerdanet.

Piou a lavaro hirroh diwar-benn al lezano-ze ?

L. LOK.

Dialog plaesant

E COLLOCOU G. QUIQUER A ROSKO (moulladur 1679) e kaver an DIALOG-PLAESANT-mañ:

- Dez mat dec'h, Iann,
- Ha dec'hu, Peres.
- Petra so à neves ?
- Goall queslou so.
- Pez queslou ? Ha maro eo an egen ?
- Cals goas so.
- Ha maro e ar marc'h.
- Cals goas so.
- An bugalé hag y so clan ?
- Cal goas so.
- Ar vrec hag y so maro ?
- Cals goas so c'hoas.
- Petra so eta, breur ?
- Deuet eus guin mat nevez voar ar quay, hoguen re quer eo, hag an dut paour à arc'hant, ne hellont quet eva, hag e hennes e ma brassa glac'har.

L. LOK.

AMAN HAG AHONT

AR STOURM EVID AR YEZOU BIHAN. — E miz eost hag e miz gwengolo

diweza, eo bet skoulmet, war zouar Breiz (e Plogoñ, da geñver XII^{ed} Skol-Hañv « Ar Falz »), ha war zouar bro-Brayañs (e-doug VII^{ed} Skol-Hañv an « Institut d'Etudes Occitanes », e Uzès), eun emgleo etre kelennerien dindan-stad evid divenn gwiriou ar brezoneg, an okitaneg, ar hatalaneg, an euskareg.

Diazezet eo bet eur gevredigez nevez, he ano « Emzao laik ar zeve-nadureziou rann-vro » (e galleg: « Mouvement Laïque des Cultures régionales »), a vo e bal kenta kas wra-raog ar stourm evid kelelnadurez ar « yezou bihan » e Bro-Hall.

Eun diskleriadenn a-bouez diwar-benn kudenn implij ar yezou-ze er skolioh a zo bet kaset e skolioh publig Breiz-Izel hag ar broiou Oc, d'ar helaouennoh ha d'eun niver braz a dud e karg en Deskadurez.

C'HWEHVED KENSTRIVADEG YANN SOHIER. — Daoust d'ar miziou braz

a gouez warno beb bloaz gand o Henstrivadeg meur, niver ar vugale hag an dud yaouank o kemer perz enno o vond dalhmad war-gresk, denhel a ra Skolaerien ha Kelennerien « Ar Falz » gand o oberenn.

Danvez Kenstrivadeg ar bloaz-mañ a zo bet nevez embannet. Kinnig a reer da skolidi ar skolioh dindan-Stad sevel eur pennad diwar-benn: « An tan ».

Goulenn a ra renerien ar Henstrivadeg skoazell an oll evid ma vo gellet rei prizioh niveruz hag a dalvoudegez d'ar honiderien. Laouen e vefent, dreistoll, o tigemer prizioh e marhadourez, n'eus forz pere: traezioh ficherez, priañ hag all, evid ar merhed; traezioh sport, traou kaer, evid ar baotred.

Eur gevrenn euz ar Henstrivadeg a vo, evel ar bloaveziou all, evid an dud deut en oad.

KENSTRIVADEG LENNEGEL EMGLEO BREIZ, dezañ eun dalvoudegez a hanter kant mil lur, a zo bet gounezet gand Fañch Inizan, ginidig euz Treflaouenan, bremañ o labourad e Pariz, evid e zastumadenn kontadennou saouruz: « A-hed ar Straejou ».

LANGUE BRETONNE, gand F. Falc'hun. — Eur studiadenn embannet gand

ORBIS, Bulletin International de Documentation Linguistique, T. VII, Nn 2, 1958 (Louvain). Menozioh reiz ha sklér diwar-benn istor ar brezoneg, e stad a-vremañ hag e amzer da zond.

BRIEF AUS DER BRETAGNE, von Hans Rheinfelder, embannet er gelaouenn

« In Dienst der Sprache », Halle, 1958. Eun enklask greet e Kastel-Paol gand eur yezoniour alaman, nehed o weled pegen dizeblant eo an dud e Breiz e-keñver o yez.

EUR MENNAD LEZENN DIWAR-BENN KELENNADUREZ YEZOU AR RANVROIOU. — Eul levrig, e galleg, embannet gand Emgleo Breiz, ennañ ar goulennou evid keleennadurez ar brezoneg, a zo da veza divennet dirag ar Gambr, er mizou da zond.

ANATOLE LE BRAZ, La Légende de la mort chez les Bretons Armoricaains. —

Embannadur nevez. Kenskrid a 15 pajenn ha pennadoù dibabet gand Per Helias, eul leor keinet kaer, ennañ ouspenn 300 pajenn, e ti ALPINA, Pariz. Oberenn vrudet Anatol Ar Braz a oa diviet pell zo. Per Helias e-neus dalhet ar pennadoù hir, ar pouezusa, goude beza lemmet kuit an notennoù berr hag an disterrachou a bonnerae an oberenn. Evelse eo bet renevezet an dastumadenn, ha kalz èsoh eo bremañ da lenn, heb koll netra euz he zalvoudegez.

R.-Y. CRESTON, Les Costumes des Populations Bretonnes. — Trede ha pevare levrenn, da zond er-mêz e miz c'hwevrer 1958.

Levr. III : Bro-Leon, Bro-Dreger, Gouelou, Kreiz Breiz.

Levr. IV : Reol evid studia dilhajoù ar bobl.

Ne vo embannet nemed 300 skwerenn euz peb leor, e-leh 1.000 evid an daou genta. Gwelloc'h eo eta rakprena, evid beza sur da gaoud eun niverenn euz ar studiadennoù priziuz-se.

Lev. III : 1.500 lur.

Lev. IV : 700 lur, Kas an arhant da :

P.-R. GIOT, Laboratoire d'Anthropologie, 2, rue du Thabor, Rennes C.C.P. 1482-28 Rennes.

EUN DASTUMAD NEVEZ A GANAOUENNOU KOZ. — Kantadoù a ganouennoù pobleg e-noa dastumet ar horonel Bourgeois, etre 1850 ha 1900; diembann e oant chomet. Kenytreuzier Sonerion Paris e-neus dibabet 80 euz ar hanaouennoù-ze ha lakaet o moula. Lezet eo e reizskrivadur hag e stumm rannyezel gand peb ger. Bez emañ an ton da heul peb son, ha burutellet eo peb tra gand an dastumer. Eur raskrid a bouez a zo ivez el levr, savet gand ar horonel diwar-benn ar zonerezh vreizeg hag ar brezoneg. Ar golo zo treset gand Yann Guinard.

Talvoudeg meurbed vo al levr nevez-mañ, evid ar re a labour pe a zo tuet gand an danvez breizeg. 750 lur franco, eo priz al levr war baper boutin, 950 lur war velin. Emañ an danvez er wask, ne vo moulet nemed d'ar rakprenerien. Kasit dioustu ano hag arc'hant da: CONFRIERIE DES SONNEURS de PARIS, 3, rue Francis-Garnier, XVII^e. C.C.P. 16-734-10 Paris.

Per HELIAS o kuitaad Radio-Kimerh

E-pad daouzeg vloaz, pennek ha birvidig bepred, e-neus lakeet Per Helias, skoazellet gand Per Trepos, buhez e abadennoù vrezoneg Radio-Kimerh.

Skrivagner donezonet kaer ha c'hoarier dispar, e-neus savet evid ar Skingomzerezh kantadoù peziou-c'hoari fentuz hag all, danvez meur a leor teo. En desped da beb seurt diaesterioù, e oa deut a-benn da aoza abadennoù hag a blije d'ar bobl, gortozet atao gand mall ha selaouet gand evez gand kemend hini a gar ar brezoneg. Evidom oll, Per Helias, o presta e vouez da Jakez Krohen, a oa ar mignon a garem kleved beb sul. Setu perag eo nehet braz e vignoned diniver, o weloud m'eo red dezañ bremañ, skuizet gand e labourioù dreist nerz an den, gouestlet da Vreiz ha d'ar brezoneg, dilezel e-pad eur boutad e gargou er Radio, evid kaoud adarre ar yehed. Salv e teuo en-dro en on touez, laouen ha dilho evel biskoaz.

Da hortoz eo bet karget Charlez ar Gall da aoza abadennoù vrezoneg Radio-Kimerh. Anavezet mad eo gand an oll evel keltiegour ha skrivagner ampant war buhez ar maeziou, hag ouspenn unan euz oberianta izili Emgleo-Breiz. Skoazellet e vo, evid ar zonerezh, gand Jef ar Penven. Ganto, e hellom beza sur, ne yelo netra da goll.

Digas a reom da zoñj d'an oll, ez eus, e-touez kevrennoù-labour Emgleo-Breiz (Strollad sevenadurel ar C.E.L.I.B.), unan ispisial evid ar Radio, o heulia ingal kemend tra a zell ouz an abadennoù. Ar zelaouerien a hell kas dezi dre lizer o menozioù hag o hinnigoù. Studiet e vezont bepred gand aked.

F. C. B. - SECTION RADIO - B. P. 17 BREST

DALHIT SONJ EUZ AN DEVEZ-MAN...

D'an 12 a VIZ EBREL 1959

E Kemper - Sal ar Gouelioù

KOROLL E-PAD

AN ABARDAEVEZ

Dindan paeroniez LISE KEMPER
ha gand skoazell LOEIZ ROPARZ

E-doug an abadenn-ze e vo :

- ◆ Roet **PRIZ LENNEGEL EMGLEO-BREIZ** d'al loread,
Fañch Inizan.
- ◆ Tennet an **TOMBOLA** evid oberennou Kendalh-Emgleo-
Breiz (Eur « 403 » da hounid!...).

Chom a ra hoaz eun nebeud bilhedou da werza. Gou-
lenn anezo digand: F. C. B., B. P. 17 BREST.

EMBANNADURIOU "EMGLEO BREIZ"

BARZONEGOU :

1. - Barzonegou Reunan Ar Mougñ..... 220 lur franco
2. - Gand Red an Dour, gand Ropars Broudig. . . 220 " "
3. - Bleuniou Arvor, gand Mab an Dig. 220 " "

DANEVELLOU :

1. - Geotenn ar Werhez, gand Jakez Riou..... 385 " "
2. - Ar Roh Toull, gand Jakez Kerrien 385 " "

MOJENNOU BREIZ :

1. - Ar Mor, gand Per Helias..... 305 " "

BREZONEG GWENED :

1. - Dason ur Galon, gand Loeiz Herrieù 670 " "
(embannet gand skoazell "Emgleo Breiz").

KAN :

1. - Kanom Uhel (Emb. Kendalc'h) 170 " "

KELENNADUREZ :

1. - Komzom, Lennom ha Skrivom Brezoneg, gand
an Dr Tricoire..... 325 " "
2. - L'Orthographe Universitaire de la Langue
Bretonne, gand F. Falc'hun (diviet)
3. - Geriadurig Brezoneg-Galleg ha Galleg-Brezo-
neg, gand Stéphan-Séité 365 " "
4. - Cent Textes Français à traduire en Breton,
gand P. Trepos 285 " "
5. - Breiz Hor Bro (Emb. Kendalc'h) 170 " "
6. - Deskom Brezoneg, Stephan-Séité 720 " "
7. - Le Pluriel Breton gand P. Trepos 1500 " "

LEORIOU SKEUDENNET EVID AR VUGALE :

1. - An Azennig bihan. 235 " "
2. - Ar Honiklig Boudedeo 235 " "

Embannadurioù "EMGLEO-BREIZ" :
Editions "Emgleo Breiz", B. P. 17 BREST
C. C. P. 380-96 RENNES

=====

Ti-Moullerez an
" Télégramme "
Leurenn Wilson
— Brest —

=====

Ar Rener: Dr DUJARDIN.



Ar Yez hag ar Vro

- EMGLEO BREIZ -

B. P. 17 BREST